

ADRIEN DE CARNÉ
BARZ AN ARVOR



Kristen ha Breizad da virviken



KRISTOF AR C'HRENV

Myster kristen enn eun Arvest



AN AOTROU FLAMMIK

C'hoari farsuz e daou Arvest



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL — 4

1911



891.
682

P.	19	et	64	Daou miz	"	Daou viz.
P.	19	l.	18,	va zen mad,	lennit,	va den mad
"	74	"	17,	Deomp Jilez,	"	Deomp Kolaz
"	87	"	10,	hostalari	"	hostaliri
"	88	"	9,	va zremm	"	va dremm
"	87	"	30	hag er	"	hag enn

KRISTOF AR C'HRENV

Myster Kristen enn eun Arvest



D'an Aotrou P. ROSEC, Persoun Brelez

TESTENI A ZOIJANS HAG A GARANTEZ



Diocèse de
Quimper & Léon
Édapté de l'édition de 1891

Document numérisé en 2016

ARGUMENT

Offeruz, païen doué d'une force colossale, a pris la résolution de servir le plus grand roi qu'il y ait au monde. Pendant qu'il sert le roi de Chanaan, celui-ci est vaincu par Mazarez, puissant monarque d'Asie. Offeruz découvre bientôt que ce dernier, qui est chrétien, redoute les mauvais anges. Offeruz, en conséquence, passe au service du démon. A son tour, le démon ayant tremblé, devant la grande croix que Mazarez avait érigée après sa victoire, Offeruz le met en fuite et interroge un vieil ermite centenaire. La Croix ! répond celui-ci, mais c'est le signe triomphal de Jésus-Christ, le Dieu de notre amour, le plus grand roi de tous les mondes et de tous les siècles. Pour plaire à Jésus-Christ, Offeruz s'installe au bord du torrent voisin, profond et dangereux, et transporte, sur son dos, tous ceux qui veulent le traverser. Or, un jour, l'enfant Jésus lui-même se présente. Offeruz le porte et se sent écrasé sous le poids de l'infini. L'enfant le baptise et lui donne le nom de Christophe, c'est-à-dire celui qui a porté le Christ. Peu après, l'empire de Mazarez étant devenu province romaine, l'empereur Dèce ordonne la septième persécution contre les chrétiens et Offeruz reçoit la couronne du martyr au pied de la grande croix de la victoire. L'enfant Jésus reparait et l'embrasse à son dernier soupir.

Celui qui cherche son Dieu le trouve !

TUD AR MYSTER :

OFFERUZ.

MAZAREZ, roue an Azia.

RAGHEL, ministr kenta ar roue.

MAKIR, ministr ar roue.

HEDER, kabiten kenta ar roue.

JEDIEL, kannad.

SIMAZ, kaner.

Eun ermid koz.

An diaoul.

JULIANUZ, rener ar vro.

Eun ofiser oc'h heulia Julianuz.

AR MABIK JEZUZ, 7 pe 8 vloaz.

Eur merzer, 30 vloaz.

Eur merzer, 20 vloaz.

Eur merzer, 12 vloaz.

SELIM, {
HIRAM, { mevelienigou Mazarez.

Ofiserien Mazarez.

Soudardet oc'h heulia Julianuz.



KENTA LODEN

An dra ma a dremen er meaz, e bro Azia

KENTA DIVIZ

RAGHEL, MAKIR

*Makir a zo azezet war eur bank. Raghel, enn e za,
a zell piz ouz ar meaz pell-pell.*

RAGHEL

Ne welan mui an enebourien, Makir. Ha ne welan mui ken nebeud hor zoudarded ni. An emgann a gendalc'h pelloc'h, hep mar ebed.

MAKIR, *o sevel hag o sellet ive*

Gwir eo. Mes pegen heuzuz eo ar brezel! Mar d'eo eat ar vrezellerien, ken hon re, ken ar re all, da stourm pelloc'h, nag a bed a zo eno, astennet war an douar, diflach evit mad, lazet neat! Spountusa tra da welet! Ar goad a red evel eur sterik, a-dreuz d'an draonien.

RAGHEL

An diou arme zo krenv ha nerzuz. Pehini anezho a vo treac'h d'eben?

MAKIR

Hon arme ni, Raghel, hon arme ni, a dra zur. Jediel, kannad ar c'habiten kenta, zo deuet aman diou weach, war varc'h, d'an daou lamm. Ni oa treac'h d'ar re all e penn kenta an emgann.

Perak ne vefemp ket er penn diveza?

Sell, setu ar roue o tont.

II DIVIZ

RAGHEL, MAKIR, MAZAREZ *tri pe bevar mevelik
gant-han*

MAZAREZ

Kelou mad a zo ?

RAGHEL *o saludi*

O c'hortoz emaomp, roue braz. Mes dioc'h ar pezh
hor beuz klevet er mintin ma, fizianz hor beuz.
(*Klevet a reer eur c'horn o seni er meaz*).

MAKIR

Selaouit. Korn an hini a jom e tal dor vraz ar
palez eo. N'ema ket pell ar c'hannad, a gav d'in.

MAZAREZ, *o komz oc'h unan euz e vevelienigou*

Selim, kea da welet piau zo aze. (*Selim a ia hag
a zeu enn dro dioc'htu*).

SELIM

Jediel eo, aotrou roue, o tiskenn diwar e varc'h
du, hag o tont aman, buhan, laouen e zaoulagad.

MAZAREZ

Gwel a ze. Ma ve fall ar c'helou, ne zeufe ket ker
buhan ze.

III DIVIZ

AN HEVELEP RE, JEDIEL

JEDIEL, *o stoui dirak ar roue*

Roue gallouduz, kelou euz ar re wella a zigan
d'e-hoc'h. Ho soudarded o deuz gounezet. Roue
douar Kanaan, paket mad, a zo chadennoù poun-
ner o starda e zaouarn hag e dreid. Ema hor c'ha-
biten kenta, Heder, an den kalounek, o tont war
va lerc'h.

MAZAREZ, *levenez enn han*

Pa vez mad ar c'helou, Jediel, an hini a zigas
anezhan a vez great eun digemer laouen d'ez-han.
Raghel, lavaret a ri d'am zenzorier rei da Jediel
kant pezh aour melen.

RAGHEL

Lavaret a rin, aotrou roue.

JEDIEL

Trugarekaad a ran va roue a greiz va c'haloun.
(*Trouz er meaz. Klevet a reer mouezioù o krial
a unan*) : Bevet ar c'habiten kalounek ! bevet
Heder ! Meuleudi d'ez-han ! Meuleudi da Heder !
(*Selim a ia da welet*).

MAZAREZ

Heder eo, o tont enn dro, leun a c'hloar.

SELIM, *o sellet atao er meaz*

Ema ar zonerien o vont da zeni d'ez-han eur zon
laouen. Mont a ran d'o ambrouk. (*Selim a ia kuit*).
(*Klevet a reer an trompillou o seni eur zon a
vrezel. Heder a zeu ebarz*).

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE, HEDER

MAZAREZ *o tegeri e zivreaç'h*

Deuz ta va mignoun karet, deuz em divreaç'h.
Seul vui ez euz bet a boan, seul vui a ze a vez a
levenez, goude an emgann. Enoret mad e vezi.
(*Eur mevelik a zeu o tougen eur gurunenn lore
aour fin war eun dorchenn voulouz*.) Setu eur guru-
renn euz ar re gaera, kurunenn lore, henvel ouz re
an impalaerien.

He lakaad a ran, a galoun vad, war da benn.

AN HOLL, a unan

Enor da viken d'hor roue Mazarez ha d'hor c'habiten Heder !

HEDER

Trugarez d'e-hoc'h, roue karet. N'em euz great nemet senti ouzoc'h. Breman, avad, p'eo gwir m'ema ar gounid ganeomp, n'euz roue ebed par d'e-hoc'h, na tost na pell.

MAZAREZ

Hag epad eiz dervez ne vezo aman nemet c'hoariou a bep seurt, dioc'h ma fell d'in. Mes, da genta, arabad eo d'eomp ankounac'haad an Aotrou Doue. Mil trugarez e rankomp da rei d'ezhan, p'eo gwir ez omp kristenien. Makir, deuz d'am selaou. Gouzout a rez ez euz, e sal vraz va falez, eul lamm-groaz koat, savet gweach all, eno, gand va zad, Doue r'e bardouno.

MAKIR

Gouzout mad a ran, aotrou roue.

MAZAREZ

Gourc'hemenn a ri, euz va ferz, ma vo digaset aman ar groaz venniget se. He sevel a raimp el leac'h ma, a zeou, war ribl ar ster, evit digas d'an holl sonj euz an emgann gounezet hirio ganeomp. Va c'hlevet mad a rez, Makir ?

MAKIR

Mad kenan, aotrou roue, ha great e vezo, hep dale, ar peza a c'hourc'hemennit.

MAZAREZ

Ha breman, va mignouned, vad a rafe d'eomp, a gav d'in, eun abadenn, eun ebad, eur c'hoari bennag. (*D'ar vugale.*) Bugale, digasit aman kadoriou d'eomp. (*Ar vugale a ra.*) Pa vez an amzer ker brao ze, e vezer gwelloc'h er meaz.

HEDER

Goulennet oc'h euz, roue braz, eur c'hoari bennag. Gwelet am euz, o tont aman, eun den iaouank o kana kanaouennou dispar, e tal an nor, dirak ar zoudarded.

MAZAREZ

Brao. Bremaik ec'h efimp eur banne gwin koz ha flour enn da enor, Heder. Hennez a roio d'eomp endra ma efimp, levenez, c'hoarz ha plijadur. (*Da Hiram*). Hiram, kerz buhan da gerc'hat ar c'haner ze, ha lavar d'ez-han, a berz ar roue, dont aman buhana ma c'hello.

HIRAM

Mont a ran, aotrou roue. (*Hiram a ia kuit. Eun trouz braz a zav er meaz, kriadennou, freuz ha talabao.*)

MOUEZIOU o krial a bouez penn

Ne d'eot ket avad, ne d'eot ket. Mir out-han da vont ta.

OFFERUZ er meaz, a vouez huel

Me a ielo, me a ielo, traou braz am euz da lavarret d'ar roue.

MOUEZIOU o krial atao

Tra, tra. Arabad eo. Ar roue ne fell ket d'ez-han.

OFFERUZ, er meaz

Ha me fell d'in mont, hag ez in ta !

V DIVIZ

AN HEVELEP RE, SELIM o tont

MAZAREZ

Petra eo, mignounik, an tregaz se a glevomp ?

SELIM

Aotrou roue, eun den eo a zo aze, o c'houlenn komz ouzoc'h, kousto pe gousto. (*Oc'h ober eur vouez krenv*) : Me fell d'in, emez-han, me fell d'in ! Braz ha krenv eo, e varo hir kenan. Aoun awalc'h am euz raz-han.

MAZAREZ

Aoun, perag ?

SELIM

Hennez a zo eur vaz deo gant-han. (*Trouz ha freuz adarre*).

MAZAREZ

Kea dioc'htu da lavaret d'ar zoudardet e fell ar roue d'ez-han gwelet an den ze. (*Selim ne finv tamm*). Kea dioc'htu, aounik. (*Selim a ia goestad*). Kerz buanoc'h, ta.

SELIM o sellet ouz ar meaz

N'eo ket red, aotrou roue. Hennez en deuz kaset kuit pell an holl zoudarded a daoliou dourn hag ema o tont. (*Offeruz a zeu, diskabel, eur zae vrun warn-han, e varo hir, eur vaz deo ha braz gant-han, eur grogenn sant Jakez a istribill oc'h e c'houzouk. En em laka war e zaoulin o saludi ar roue.*

VI DIVIZ

AN HEVELEP RE, OFFERUZ

MAZAREZ

Sao, va mab, ha lavar ar pezh e peuz da lavaret.

OFFERUZ o sevel

C'hoant braz am euz, aotrou roue, da zont da vevel gan-e-hoc'h.

MAZAREZ

Da zont da vevel ganen. Ha perak ta ?

OFFERUZ

Me a oa mevel e ti roue douar Kanaan, ma z'oc'h bet treac'h d'ez-han hirio. (*Raghet a zell piz oc'h Offeruz*).

MAZAREZ

Ha neuze, o veza ma z'eo hennez trec'het ha reu-zeudik, emañ o vont da zilezel anezhan. Feiz ! ne ket gwal v Rao da vennoz, a gav d'in.

OFFERUZ

Ne ran ket fae, tamm ebed, euz ar roue ze. Eun truez braz am euz out-han. (*Raghet a zell oc'h Offeruz dalc'hmad*). Mes eur gwestl am euz great enn oun va unan, pell zo.

MAZAREZ

Pe westl ?

OFFERUZ

Beza mevel beteg va alañad diveza.

Mes diwalit ! ne fell d'in beza nemet mevel roue, ha d'ar roue ar c'halloudusa ma c'hellfen kaout.

C'houi zo galloudusoc'h eget ar paour roue douar Kanaan, o veza ma zoc'h treac'h dez-han. C'houi a vezo va mestr.

MAZAREZ

Ha pegement e fellfe d'id gounid ?

OFFERUZ

Netra. Va bara bemdez ha netra ken.

MAZAREZ

Ha pe seurt labour e ri ?

OFFERUZ

An holl labouriou, ha dreist holl ar re boaniusa.

Dic'hrisienna a ran gwez ugent vloaz gant va daouarn.

MAZAREZ, *o vouse'hoarzin*

Petra a reer ac'hanoud ?

OFFERUZ

Offeruz. (*Raghel a ra eul lamm o veza souezet*)

RAGHEL

Roue Mazarez, gouzout a ran piou eo an den ze ; va c'henvroad eo. Hen o veza paour, ha me pinvidik, n'anavez ket ac'hanoun, mes anaout a ran anezhan me, heb fazi ebed, dioc'h e vouez, dioc'h e zremm ha dioc'h e hano. Ne ket gevier eo ar pezh a lavar d'e-hoc'h, aotrou roue. Ker krenv eo ma n'en deuz ket e bar war an douar. Pa jome er vro gaer a zo enn-hi menezioù huel Liban, hennez a flastre evel kelienn, en e zaouarn, leoned, tigred, ourzed ha moc'h gouez.

Eun dervez gouel me am euz her gwelet. Eur maread tud a oa pignet enn eur vag, war eur ster zoun. Ar vag, enn eun taol, paket gant avel dro a ioa o vont da goll. An dud paour ! Setu Offeruz o tont en dour d'an daou lamm. Kregi a reaz er vag, hag a dennaz anezhi war an aot. Hennez, aotrou roue, a vezo eur mevel dispar.

(*Epad m'ema Raghel o komz, tud a zeu e gweled an teatr, hag a laka enn he sa, a zeou, ar groaz vraz, hervez gourc'hemenn ar roue*).

MAZAREZ

Mad ; great ar marc'had. Selim, laka an daol ha digas d'eomp podou leun a win hag an hanafiou aour fin. (*Selim a ia kuit*).

VII DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet Selim, HIRAM, SIMAZ*

HIRAM

Divezad omp eun tamm, mes ar c'haner oa eat kuit, ha poan am euz bet oc'h e gaout.

MAZAREZ

Petra e peuz, kaner, da gana d'eomp endra ma efimp ouc'h an daol ?

SIMAZ *o stoui dirak ar roue*

Ar pezh a blij o d'an aotrou roue ha d'e ofiserien.

MAZAREZ

N'euz forz, gant ma vo brao ar zon a gani.

SIMAZ

Ne ouzoun nemet kanaouennou dioc'h an dibab, aotrou roue. D'e-hoc'h e kinnigann *Son ar Groaz arc'hant*.

MAZAREZ

Hano ar ganaouen ze a blij d'in. Kan anezhi d'eomp. (*Endra m'ema Simaz o kana, Selim a laka war an daol podou gwin, hag hanafiou aour, hag a ziskarg gwin d'an holl*.)

SON AR GROAZ ARC'HANT

War don : *Baron Jaouios* (1)

Eur plac'h iaouank a lavare
D'he mignounik, e miz gouere :
Emaoc'h o vont d'ober brezel,
N'euz ken mui d'in nemet mervel.

(1) Barzaz-Breiz.

A berz ho mignounez karet
Setu tri zra bet benniget :
Eur groaz arc'hant, eur vleunenn baour,
Hag eur walenn, va gwalenn aour.

Sonj euz ho pro gand ar vleunenn
Sonj ac'hanoun gand ar walenn,
Ar groazik r'ho miro bepred
Dioc'h fallentez an drouk spered.

Rag er vro ma zoc'h, mignoun ker
O vont enn-hi, dioc'h a c'houzer,
An diaoul heuzuz, feiz va Doue
Zo bet lekeat, pell zo, da roue.....

MAZAREZ (*o sevel, strafilet neat, hag o miret oc'h
Simaz da beur-ober e ganaouenn*)

Na lavar ket hirroc'h, kanerik dister. N'euz
nemet hano an diaoul enn da ganaouenn. Kea kuit.

SIMAZ, (*spountet*)

Aotrou roue, mar plij.....

MAZAREZ

Kea kuit er meaz ac'halen. (*Simaz a ia kuit*).
Offeruz, deuz da zevel diwar an daol ar podou gwin
hag an hanafiou goulo.

VIII DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet Simaz*

OFFERUZ, *a vouez huel*

Ne rin ket, aotrou roue, ma ne lavarer ket d'in
piou eo an diaoul ha perag a zo bet kroget aoun
enn-hoc'h o klevet e hano.

MAZAREZ, *drouk enn-han*

Sav an traou diwar an daol dioc'htu.

OFFERUZ

Ne rin ket, eur weach c'hoaz, nemet ma leverot
d'in ar pezh a c'houlennan digan-e-hoc'h.

MAZAREZ

Pebez penn mul a zo war da ziskoaz. Selaou ta
neuze, den pennek. An diaoul zo eur spered fall
kenan, an hini kriza ha spountusa eo e touez ar re
griz hag ar re spountuz. Enebour touet d'an dud
eo, atao a enep d'eomp, atao o klask ober gaou
oc'h an holl, pe vraz, pe vihan, pe baour, pe bin-
vidik, pe rouaned, pe zujidi. Mar fell d'eomp chom
fur, aoun vraz e rankomp da gaout rak an diaoul.

OFFERUZ, *o c'hoarzin*

Aoun vraz, aoun vraz; n'ouzoun ket me, petra
eo kaout aoun. N'em euz ket bet biskoaz ha n'am
bezo ket da viken aoun ebet rak n'euz forz piou.

Mar sav aoun gan-e-hoc'h rak an diaoul, hennez
zo krenvoc'h ha brasoc'h eget hoc'h. Ha n'eo ket
gwir ? (*Mazarez a zoubl e benn hep lavaret tra*).
Livirit ta ! Hennez zo krenvoc'h eget hoc'h ?

MAZAREZ

Krenvoc'h eget an den eo, aliez.

OFFERUZ

N'eo ket red chom da varc'hata pelloc'h. Kenavo,
roue ; me fell d'in mont da vevel gand an diaoul ;
ho trugarekaad a ran evit ho madelez. Kenavo.

MAZAREZ

Chans vad d'id, Offeruz. Mes an diaoul a zo fin.
Taol evez ! taol evez mad ! (*An holl a ia kuit, nemet
Offeruz, o chom e unan, e vaz deo gant han evel
kent*).

IX DIVIZ

OFFERUZ, e unan

Nag a boan zo evit kaout ar roue ar brasa ! Hag oc'h penn, da beleac'h ez in me da welet an diaoul ? Ar roue, koulskoude, en deuz lavaret e vije an diaoul eur spered. Eur spered a zo skanv a skouarn dioc'h a leverer. Mar galvjen anezhan, marteze e teufe. (*O krial*). Hola ! hola ! diaoul, spered gallouduz, peleac'h ema oud ? Lavar ta ! (*O sellet oc'h pep tu*). Tra ebed, nemet unan euz ofiserien ar roue Mazarez o tont enn dro, aman. (*An diaoul a zeu, eur vantel vraz a liou ruz warn-han, eur c'hleze staget oc'h e c'houriz*).

X DIVIZ

AN DIAOUL, OFFERUZ

OFFERUZ

Aotrou 'n ofiser, me ho ped...

AN DIAOUL

N'oun ket ofiser. Me zo an hini m'emaoud oc'h e glask, hag a reer an diaoul anezhan, dioc'h lavar bugale Adam.

OFFERUZ

Mad. Ar roue Mazarez, ma z' edoun e vevel n'euz nemet eur pennad; a zo aounik raz-oud evel eur plac'hik. Rak se am euz e zilezet. En em westla am euz great, a bell zo, d'ar roue ar c'hrenva. Te zo krenvoc'h eget Mazarez p'eo gwir en deuz kemend all a aoun raz-oud.

AN DIAOUL, o tirolla da c'hoarzin

Ha, ha ha ! Krenvoc'h eget Mazarez ? Krenvoc'h oun, a dra zur, ha krenvoc'h eget n'euz forz pehini euz an holl rouaned a zo bet, a zo hag a vezo da

viken war an douar. Mar fell d'id gwelet ha klevet va galloud, sell ha selaou. (*An diaoul a sko e droad enn douar. Luc'hed a ra kerkent, ha klevet a reer ar gurun*). Daoust hag a c'hellje Mazarez, pe eur roue all, lavaret d'al luc'hed ha d'ar gurun senti out-han ?

OFFERUZ

Te zo ar c'hrenva anezho holl, evel a welan. Kemer ac'hanoun da vevel. Eur pezh mad a vara, bemdez, ne c'houlennan ken. Me a vezo eur mevel sentuz avad.

AN DIAOUL

Ha me eur mestr laouen ha mad. Da zourn em hini. Tud zo hag a lavar ez oun eur mestr fall, eun toueller, o vont atao da ober troiou kamm d'an dud. N'eo ket gwir. Ar re a zo enn eun tu ganen, ne reont nemet c'hoarzin. N'euz nemet ebatou ha festou gant-o.

OFFERUZ

Goap a ran, me, euz an ebatou. Ne garann nemet al labour.

AN DIAOUL

Evel ma plijo d'id. Mes da nebeuta, o veza ganen, gand ar roue ar c'halloudusa e vezi, va mab, dioc'h da c'hoant.

OFFERUZ

Setu ar pezh a c'houlennan.

AN DIAOUL

Forz e pe leac'h ez i, va galloud en em astenn eno, (*o tiskouez ar pevar avel*), adalek an hanter noz betek ar c'hresteiz, adalek ar zao heol betek ar c'huz heol. (*O trei evelse, an diaoul a well ar groaz vraz, a laosk eur griadenn grenv hag a laka e zaouarn war e zaoulagad*).

OFFERUZ

Petra ta ? petra ? poan e peuz enn da zaoulagad ?

AN DIAOUL

N'em euz ket, mes evelato, deomp kuit, deomp buhan.

OFFERUZ

Buhan ! buhan ? Perak ta mont kuit ker buhan ze ? Te a zo bet dallet da zaoulagad o welet ar groaz vraz a zo aze. Perak ?

AN DIAOUL

P'en em gavan gant skeudenn ar groaz, aoun am euz.

OFFERUZ

Aoun adarre ? te ivez e peuz aoun ? Aoun rak piou ?

AN DIAOUL

Rag an Hini zo bet staget ouz eur groaz, daou c'hant hanter kant vloaz zo.

OFFERUZ

Piou eo hennez ?

AN DIAOUL

Hennez a vez great Jezuz-Krist anezhan.

OFFERUZ

Eur roue eo ? (*An diaoul ne lavar ger*). Eur roue eo ?

AN DIAOUL

Eur roue eo.

OFFERUZ

Mad. Me a vezo e vevel. Ha breman, avad, kea kuit buhana ma c'helli, d'al leac'h ma kiri. (*An diaoul ne finv ket*). Hast affo, ta ! ma ne fell ket d'id e c'houlenfenn d'ar roue Jezuz-Krist dont aman. (*An diaoul a ia kuit d'an daou lamm*).

XI DIVIZ

OFFERUZ, e unan, azezet

Awalc'h am euz me, gand ar rouaned se hag o deuz, holl, aoun rag eun dra bennak. Roue douar Kanaan a zo eat kuit, ar roue Mazarez ive, an diaoul ive. Choum a ran me va unan evel kent, hep gouzout da beleac'h mont. (*O sellet warzu ar meaz*). Ha setu o tont, etrezek enn oun, eun den koz koz, kroummet en e zaou bleg a zindan beac'h e gorf. Ar re goz evelthan a zo ar furnez gant-o. Eun den a guzul vad eo, a dra zur. Eun ali bennag e c'houlennin digant-han. (*Eun ermid a zeu, oc'h en em harpa war eur vaz, eur zae zu warn-han, eur c'hougoul war e benn*).

XII DIVIZ

OFFERUZ, AN ERMID

OFFERUZ

Eul leac'h bihan zo war ar bank se, va zen mad. C'houi zo skuiz braz, war a gredann. Azezit em c'hichenn.

AN ERMID, oc'h azeza

Mil bennoz Doue warnoud, va mab. Skuiz maro oun evel a levere. Ne ket souezuz kement se, rak am euz paket, daou miz zo, va c'hant vloaz.

OFFERUZ

Ha n'oc'h ket pinvidik braz, dioc'h ho toare.

AN ERMID

Ar baourentez a zo ganen abaoe ma-z'oun bet ganet. Mez karet a ran stard ar baourentez. Hounnez zo va c'hoar venniget.

OFFERUZ

Me a zo ker paour ha c'houi. (*O tenna eun tamm bara euz e c'hodell hag oc'h e rei d'an ermid*). Eur c'hreun bara n'em euz ken. Mes a greiz kaloun e rei a ran d'e-hoc'h.

AN ERMID, o kemeret ar bara

Eun digoll kaer az pezo, va mab, evit da galoun vad, er bed all.

OFFERUZ

Hag eun all, marteze, er bed ma, diganehoc'h.

AN ERMID

Penaoz ta ?

OFFERUZ

An dud, pa vez kant vloaz o poeza war o fenn, a vez gwiziek meurbed. Ar re ze o deuz klevet, gwelet ha desket meur a dra.

AN ERMID

Gwir eo.

OFFERUZ

O klask eur roue gallouduz meurbed emañ. Klevet ho peuz ar vrud anezhan marteze.

AN ERMID

Piou eo ?

OFFERUZ

Jezuz, a c'halver ive Krist.

AN ERMID, *levenez vraz enn han*

Jezuz Krist ! Mil ha mil bennoz ! Hen anaoud hag her c'haroud a ran gand holl nerz va c'haloun baour. Roue ar rouaned eo.

OFFERUZ

Ha peleac'h ema hen ?

AN ERMID

E peb leac'h, war an douar hag enn env.

OFFERUZ

Me fell stard d'in e gaout ha mont da vevel gant-han. Petra rin-me ?

AN ERMID

N'euz netra a ve easoc'h. N'az pezo ken da ober nemet mired dalc'hmada ar iunioù.

OFFERUZ

Ne rin ket avad. O veza paour braz, n'em euz da zibri nemet bara, mez kalz e tebrann anezhan, pa vez. Ma venn me pinvidik, krenv ha braz evel ma z'oun, me a zebrje bemdez eur c'havrik pe eur maout a bez. Ne fell ket d'in mired iun ebet.

AN ERMID

Mad. Setu eun dro all. Lavar bemdez kalz a bedennoù, a greiz da galoun.

OFFERUZ

Ne rin ket ken nebeud. Pedennoù ? Petra an dra ze ? Ne ouzoun ger ebed anezho.

AN ERMID

Mad. Eun dra all c'hoaz a c'hellez da ober. Sell ouz ar ster ze, striz ha doun, o trouzal enn hor c'hichenn. Eur maread tud a zo bet beuzet ebarz, oc'h he zreuze. Te zo krenv braz. Mar karez dougen war da ziskoaz nep a zavo c'hoant gant-han treuza ar ster, karga a ri kaloun Jezuz a levenez.

OFFERUZ

Laouen braz e rin kement se. Eun ti-soul e savin evidoun, war ribl ar ster, ha kemend hini a zeuio, pe vad, pe zrouk, noz deiz, ne dremenint a dreuz d'an dour red ze nemet war va diskoaz.

AR ERMID

Hag oc'hpenn, mar d'oud krog mad gant al labour ze, eur binijenn galet e ri evit da bec'hejou. Ar binijenn a zo red. (*O sevel*). Kenavo, va mab. N'anavezvez ket c'hoaz ar roue Jezuz-Krist. Hen anaout a ri.

Ar goel a zisken



EIL LODEN

*An dra ma a dremen er meaz, enn hevelep
leac'h, e tro an abardaez, dek vloaz goude*

KENTA DIVIZ

OFFERUZ, azezet, e unan e traon ar groaz

Setu va labour great, evit an dervez ma, da vihana. Oc'hpenn ugent den am euz douget, hirio, a dreuz d'an dour, war va diskoaz, hep anaout hini ebed anezho. Daoust d'in d'en em gaout, bemdez, gant kemend all a dud, emañ ganen va unan atao. Va mignoun koz an ermid a zo maro. Araok mervel, sonj am euz, en deuz kroget em dourn, o sevel war zu an env e zaoulagad leun a sklerder. (*O sellet oc'h an env.*) Ha setu an env se m'emaoud enn-han, va mignoun karet. Setu an env se o lugerni gant mil ha mil stereden aour. Skuiz oun, skuiz maro. Vad a rafe d'in eur c'houkedik bihan. (*Offeruz a gousk*).

AR MABIK JEZUZ, er meaz

Offeruz! mevel Doue, deuz d'am c'herc'hat.

OFFERUZ o tihuna

Petra ta? oc'h huvreal emañ. Eur vouez flour am euz klevet o c'hervel ac'hanoun. (*Kousket a ra adarre*).

AR MABIK JEZUZ er meaz

Offeruz! mevel Doue, deuz d'am c'herc'hat.

OFFERUZ, o tihuna hag o sevel

Ne ket huvreal eo am euz great enn taol ma.

Deomp da welet. (*Offeruz a ia, hag a zeu enn dro dioc'htu*). Den ebed. Klevet fall am euz, a dra zur. (*En em astenn a ra adarre, e traon ar groaz, hag a gousk*).

AR MABIK JEZUZ, *er meaz*

Offeruz ! mevel Doue, deuz buhan ta, deuz d'am c'herc'hat.

OFFERUZ, *o sevel*

Eur vouez a glevann adarre, krenvoc'h eget araok. (*Sevel a ra, hag a zeu enn dro dioc'htu dourn ha dourn gant ar Mabik Jezuz*). Petra a fell d'id va c'hezik karet ?

AR MABIK JEZUZ

Tremen an dour red se war da ziskoaz.

OFFERUZ, *o lakaad ar mabik war e ziskoaz*

Eaz eo, mignounik, skanv ma z'oud evel eul labousik euz an env. Deuz. (*Offeruz a ia a dreuz d'an dour. Kroummet eo dindan pouez ar bugel*). Taol evez ta ! Na bouez ket evelse warn oun. (*Kroummet eo mui oc'h mui*). Kleo ta adarre, bugel keaz ; emamp o vont da veuzi hon daou, ker pounner evel ma z'oud. (*Offeruz, skuiz braz, en em gav enn tu all d'ar ster, hag a laka ar bugel war an douar*). Sell ta ! Penaoz e c'hell beza ker pounner eur pao-trik evelvoud ? Me a grede d'in edo ar bed war va diskoaz !

AR MABIK JEZUZ

Kement se ne d'eo ket souezuz. Dougen e peuz great ar bed, ha gwella zo, an hini en deuz her c'hrouet. Me a zo ar roue Jezuz-Krist, m'emaoud oc'h e glask. Me zo da Zoue ha da vestr.

OFFERUZ

Va c'haloun a drid gant levenez an envou.

AR MABIK JEZUZ, *o c'hoari gant krogenn sant Jakez a zo a istribill oc'h gouzouk Offeruz*

Perag e peuz ar grogenn v Rao ze a istribill oc'h da c'houzouk ?

OFFERUZ

Evit tenna dour euz ar ster, da eva pa m'euz sec'het.

AR MABIK JEZUZ

Me fell d'in he c'haout ; mez re vraz oud. Ne c'hellan ket he distaga. En em strink war da zaoulin. (*Offeruz en em strink war e zaoulin. Ar Mabik Jezuz a zistag ar grogenn, a laka eur banne dour euz ar ster ebarz, hag a skuill anezhan war benn Offeruz*).

Offeruz ! me az padez enn hano va Zad, hag em hano me va unan, hag enn hano ar Spered Santel. Diwar vrema, ne vezi mui galvet Offeruz. Great e vezo ac'hanoud KRISTOF, da lavaret eo an hini en deuz douget ar C'hrist. Mevel Doue, te zo benniget da viken.

OFFERUZ, *o pidi a greiz kaloun*

Ne d'a ket kuit c'hoaz, roue va ene, Doue va c'haloun ! ne d'a ket kuit.

AR MABIK JEZUZ, *o vouse'hoarzin*

Ne c'hellan ket choum pelloc'h.

OFFERUZ

Ha peur, hag e peleac'h e welin me neuze da zremm ha da zaoulagad ker skeduz, bugelik laouen ha karantezuz ?

AR MABIK JEZUZ, *o vont kuit goestad, war e gil, en eur zellet ouz Offeruz gand eur mousc'hoarz*

Er baradoz !

II DIVIZ

OFFERUZ, *e unan e zaouarn war boull e galoun*

Va Jezuz karet ! Va Jezuz muia karet ! Douget am euz da gorf sakr. Me ! eur pec'her paour, am euz digemeret etre va divreac'h an Doue santel meurbed en deuz krouet an env hag an douar. Allaz ! allaz ! eat eo kuit ar c'hrouadur adoret se hag a zo kaer euz ar re gaera ! Penaoz e c'hellin me beva, breman, hep d'han ? Pegouls e teuio an deiz se, deiz benniget va maro ? Pa plijo gant Doue ! Da c'hortoz, ober a rin al labour en deuz gourc'hemennet d'in. Ne oufenn ket ober gwel. (*O sellet warzu ar meaz*). Sell ! setu al labour a c'houlennan. Tud a welan o tont aman da dreuzi ar ster.

III DIVIZ

OFFERUZ, EUN OFISER, TRI DEN IAOUANK, *chadennet, o vont da veza merzeriet*

OFFERUZ

Emaoc'h o vont da dreuzi ar ster ?

AN OFISER

N'omp ket. Ar broiou ma z'oa gweach all ar roue Mazarez o ren warn-o a zo breman dindan galloud an impalaer a Rom, Trajanuz Desiuz. Hennez a fell d'ez-han laza hep truez ebed ar chas se a c'halver kristenien. Emaoun o kas d'ar maro an dud iaouank-se, kristen o zri.

OFFERUZ, *a vouez krenv*

Enor ha gloar d'e-hoc'h, va bugale ! Dalc'hit stard evit ho feiz, evit ho Toue an Aotrou Jezuz benniget. Ar maro ar c'hrista pa c'houzanver evit hano Jezuz, a vez sioulloc'h eget eur c'houisk. Enor ha gloar d'e-hoc'h, kristenien galounek.

AN OFISER *drouk enn-han*

Na lavar mui ger ebed pe e vezi diskleriet da Julianuz, a ren ar vro enn hano an impalaer, hag a jom tost aman.

OFFERUZ

N'em euz aoun ebed ; ne ran forz me nag euz ar rener nag euz an impalaer. Nemet ar maro ne c'houlennan mui netra er bed ma.

AN OFISER

Eaz e vezo rei da c'houlenn d'id, bleiz koz.

OFFERUZ

Mad ; am c'haout a ri aman, e traon ar groaz se pa falvezo d'id.

AN OFISER

Chom sioul ; ne rin nemet mont da laza ar re man ha dont enn dro dioc'htu, gand ar rener.

OFFERUZ

Ho kortoz a ran. (*An ofiser hag an dud iaouank a ia kuit*). Dalc'hit mad, paotred ! Bevet Jezuz ho mestr ha va hini me !

IV DIVIZ

OFFERUZ *e unan, o sellet war zu ar meaz*

Ne c'hortozin ket pell, a gav d'in. Ar rener Julianuz eo a zo o tont etrezeq an ofiser hag an dud iaouank, war an hent. Tud zo gant-han. An tri merzer iaouank a ia d'ar maro enn eur park. Setu soudarded hag an ofiser o kerzet a unan, gand ar rener. O levenez dispar ! O Doue va c'harantez !

V DIVIZ

OFFERUZ, JULIANUZ, AN OFISER, DAOU PE DRI
SOUDARD, *klezeier gant-o*

AN OFISER

Setu aze, ~~an~~ aotrou rener. Hen eo.

JULIANUZ

Te eo e peuz drouk komzet d'an impalaer ?

OFFERUZ

N'em euz lavaret ger ebed a enep d'ez-han, mes
lavaret am euz n'oan ket evit senti out-han ken-
toc'h eget senti ouz an Aotrou Doue Jezuz-Krist.
Hag hel lavaret a ran adarre.

JULIANUZ

Na lavar ket an hano ze. N'euz doueou nemet
doueou an impalaer.

OFFERUZ

N'euz nemet unan, hon hini. Kristen oun ha
kristen beteg mervel.

JULIANUZ

Mad, mervel a ri, ha raktal.

OFFERUZ

Mar fellfe d'in, ne varfenn ket. Va nerz me a zo
dreist nerz an dud, hag e c'hellfenn ho laza holl,
enn eun taol. Mes ne rin ket, avad, o veza ma z'oun
kristen. Skoit gan-en.

JULIANUZ

Eur weach c'hoaz me a c'hourc'hemenn d'id senti
ouz an impalaer.

OFFERUZ, *a vouez huel*

Hag eur weach c'hoaz me a lavar : Bevet Jezuz-
Krist ! roue ar rouaned, impalaer an impalaerien.
*(Julianuz, gand e zourn, a ro d'ar zoudarded eur
gourc'hemenn. Ar zoudarded a laz Offeruz gand ar
c'hleze. An holl a ia kuit. Offeruz, e zaouarn war e
c'houli marvel, a ia e traon ar groaz hag a laka e
zivreac'h enn dro d'ezhi.)*

OFFERUZ

Neb a glask e Zoue, a gav anezhan. Neb a zouge e
Zoue gant-han, a vev da viken. An env a welan
digoret, hag an elez o tont d'am c'herc'hat. Kroaz
va Zalver, ra vezi benniget... Te eo... te eo... e
peuz va saveteet... Aotrou Jezuz... a garan
kemend... Mervel a ran... Mervel a ran...
evidoc'h.

*(Ar Mabik Jezuz a zeu goestad, hag a bok da
Offeruz, e traon ar groaz.)*

AR MABIK JEZUZ

Deuz, va merzer karet, deuz er baradoz !

Ar goel a zisken evit mad.



An Aotrou Flammik

C'hoari farsuz e daou Arvest



ARGUMENT

Jean Soner, fils d'un digne cultivateur de Lanri-voaré, s'est mis dans la tête de devenir *un Monsieur de la ville*. Trois rusés fripons s'empressent d'en profiter et lui extorquent son argent par des flatteries, des promesses et de fausses décorations. Après un dîner copieux, ils s'esquivent en volant divers objets dans l'hôtel de la Croix Blanche à Brest, où réside Jean. Olier, le patron, réclame à Jean ses dépenses et le prix des objets volés. Intervention des gendarmes. Jean, furieux, donne dans sa colère, des explications assez incohérentes pour qu'on le croie fou. On commet des médecins ; deux avocats viennent encore embrouiller la situation, qui est dénouée par Fanch, père de Jean. Celui-ci, guéri à tout jamais des grandeurs, retourne à Lanrivore avec son père. Fanch tire la morale de l'histoire : chacun à sa place. Celui qui veut faire le monsieur fait l'imbécile. Gardons, comme nos pères, les nobles costumes de Bretagne ; gardons aussi, comme eux, notre foi chrétienne. Chant des ancêtres.

Jean Soner, par la force des choses, est un peu parent du *Bourgeois gentilhomme*. Notre grand Molière nous pardonnerait, de tout cœur, quelques situations et quelques détails rappelant l'immortel M. Jourdain.

C'HOARIERIEN :

IANN SONER (*an aotrou Flammik*).

FANCH, e dad, tiek e Lanrivoaré.

OLIER, mestr hostaliri ar Groaz-Wenn.

TOUNIK }
JAKOU } mevelien kegin e ti Olier.
PERRIK }

KRABAN, iuzeo koz }
ALAN } riblerien touet, o zri.
JOBIK }

JILEZ }
KOLAZ } archerien.

SALAUN }
KERAVEL } medisined.

STRAKELL }
MELIZ } alvokaded.

AR C'HEMENER.

EUR C'HANER koz, o werza kanaouennou.

Eun toullad mevelienigou kegin.

Eun toullad tud euz a Lanrivoare.



ARVEST KENTA

*Eur zal vraz e hostaliri ar Groaz-Wenn
e Brest. Kadoriou. Taol vihan en eur c'horn*

KENTA DIVIZ

TOUNIK, PERRIK, JAKOU

*Ema Jakou ha Perrik azezet o labourat. Jakou a
ziblu eur iar, Perrik a ziblusk avalou douar.
Tounik, enn e za, a rins gwerennou.*

JAKOU

Ia, mignoured, skuiz awalc'h oun gand ar c'hoz
ti ma. N'euz dervez ebed da ziskuiza, da zul ken
nebeud.

PERRIK

Evidoun-me, avad, en em gaout a ran mad aman.

TOUNIK

Ha me ive, a dra zur.

JAKOU, souezet

En em gaout mad a rit aman ho taou ?

PERRIK

Ia avad.

TOUNIK

Hep mar ebed. (*Sevel a reont o zri*).

JAKOU

Perak ?

PERRIK, *oc'h hejal e c'hodell*

Va godell a zo leun a liardou brao.

TOUNIK, *oc'h hejal e c'hodell*

Em hini me ez euz kalz a besiou arc'hant gwenn.

JAKOU

An aotrou Olier eo, hor mestr, hag a ro d'e-hoc'h kemend all a arc'hant ?

PERRIK, *o c'hoarzin*

An aotrou Olier ? Hennez ne ro d'eomp nemet ar pez zo red da viret ouzomp da vervel gant an naoun.

TOUNIK, *oc'h ober goap euz Jakou*

Te zo digor da zaoulagad ha ne welez tra ; te zo skouarnek ha ne glevez ger. Mes da c'hinou zo bravoc'h c'hoaz. Eur bek foun eo.

JAKOU, *eun tammik drouk ennan*

Ro peoc'h, ta, koz mevel kegin.

TOUNIK

Selaou mad. Anaout a rez unan bennag o choum, daou miz zo, enn hostaliri ma, hag a reer lann Soner anez-han ?

JAKOU

Hen anaout a ran ; eun den a lignez vraz eo.

TOUNIK, *o c'hoarzin*

Ia ta ! A lignez vraz evelvoud. Hennez zo ginidik euz a Lanrivoare, m'oar vad. Mez c'hoant braz en deuz da gaout doare eur bourc'hiz pinvidik. Eun diot n'eo ken, mes e c'hodellou a zo leun a wenneien.

PERRIK, *o c'hoarzin*

Hag ar gwenneien ze a ia, bemdez, goustadik, goustadik, euz e c'hodellou dez'han, enn hor godel-lou deomp-ni. Ha, ha, ha ! (*Perrik ha Tounik a hej o godellou*).

JAKOU, *souezet*

Ha penaoz e c'hoarvez kement se ?

TOUNIK

Eaz eo. N'euz ken da ober nemet lavaret dez'han kalz a gomzou flour. Rei a ra neuze arc'hant leiz an dourn.

JAKOU

Gwir ? An arc'hant n'int ket diez da c'hounid er c'hiz se. (*Olier a zeu goestad. Choum a ra e gweled an teatr ; an tri ne welont ket anez-han*).

TOUNIK

Sell ! ne zaleo ket hennez d'en em gaout aman. Ne peuz ket c'hoant da ober an dro gaer ze ?

JAKOU

Eo, eo ; eur pezik arc'hant, eur weach enn amzer, ne zisplijfe ket d'in.

II DIVIZ

AN HEVELEP RE, OLIER

OLIER, *gant eur vouez rust*

Brao ! va faotred. Kaozeal a rit evel teir flac'h e leac'h ober ho labour. Ha petra a livirit ? C'houi zo re hir ho teodou, me a gred. Edo Tounik o lavaret : Ne peuz ket c'hoant da ober an dro gaer ze ? Pe seurt tro ?

TOUNIK

Tro kear Vrest, disul kenta.

OLIER

Gaouiad ! Awalc'h ! Likiit an daol, aozit pep tra. Eur goan vraz a vezo roet hirio aman.

PERRIK

Evid eun eureud bennag ?

OLIER

Evid eun dra gaeroc'h eget eun eureud. Marc'had braz ar zaout en em gavo warc'hoaz e Brest. Oc'h-penn tri c'hant ejenn lard ez euz e Brest, deuet euz a bevar c'horn ar vro. An aotrou Prefed Kemper en deuz kaset e segretour da Vrest da rei priziou d'an dud o deuz savet an ejenned brava. Hennez a zeuio, hirio, da goania em zi. C'houi ho taou, Perrik ha Jakou, deuit er gegin. Te avad, Tounik, chom aze, ha skub ar zal. (*Olier, Jakou ha Perrik a ia kuit*).

III DIVIZ

TOUNIK, *e unan. Skuba a ra eun tamm ha trei a ra warzu an dud*

Me zo finoc'h eget ar paour keaz Jakou ze. Iann Soner a gav mad rei e wenneien. Me a gav mad o c'hemeret. Leshanvet eo an aotrou *Flammik*. Al leshano ze a zo gwir. C'hoant en deuz da gaout eur mevel bihan, dioc'h a leverer. Ma c'helljen me mont da vevelik gant-han, me a c'hounesfe gwelloc'h va buez paour. (*Skuba a ra. Iann a zeu ebarz*).

IV DIVIZ

TOUNIK, IANN

TOUNIK, *o stoui dirak Iann*

Me ho salud, aotrou markiz.

IANN

Petra ? N'oun ket markiz, siouaz !

TOUNIK

Me a oar eo an aotrou Soner a zo dira-z-oun. Mes, evit gwir, e lavarfed e vijec'h an aotrou markiz ar Feunteun-Zioul, mestr eur c'hastel braz tost da Gemper.

IANN, *laouen*

Penaoz ? Me zo henvel oc'h an dichentil ze ?

TOUNIK

Henvel poch. Mes koulskoude, c'houi zo eun tamm dishenvel diout-han.

IANN

Kousket oud ? Me zo henvel ha dishenvel ?

TOUNIK

Setu aman. Mar d'oc'h henvel poch out-han, c'houi zo, evelato, bravoc'h, gwelloc'h ha laouenoc'h eged-han. Ia, aotrou, ia.

IANN

Gwir ?

TOUNIK

Ho fri zo koantoc'h, ho taoulagad lemmoc'h.

IANN

Gwir ?

TOUNIK

Ho tivoc'h rusoc'h, ho pleo hirroc'h.

IANN, *levenez enn han*

Ha !

TOUNIK

Ho toare furoc'h, ho tremm drantoc'h.

IANN, *lorc'h braz enn han*

Ha, ha ! va mignounik, petra a liviri neuze, pa weli va dillad nevez ? O c'hortoz ar c'hemener emañ. Te zo eur paotr fin, evel a welan ; (*o rei d'ez-han eun dournad gwenneien*). Dal ! paotrik, kemer an arc'hant se da eva eur banne d'am iec'het.

TOUNIK, *levenez vraz enn-han*

Mil bennoz Doue d'e-hoc'h, aotrou. (*Kana ha dansal a ra war don gallek : J'ai du bon tabac*).

La la la la la, la la la lan laire,

La la la la la, la lan laire, la !

(*O komz oc'h Iann*). Aotrou ?

IANN

Petra ?

TOUNIK

O klask eur mevel bihan emaoc'h ?

IANN

Emaoun.

TOUNIK

Me a garfe mont gan-ehoc'h. Fur e ve in ; eur paotrik zo oc'h ho kortoz er gegin, hag en deuz c'hoant da veza ho mevel. Va c'hemerit, aotrou. Egile a ielo em leac'h me gand an aotrou Olier.

IANN

Ni a welo. Da c'hortoz, kea d'ar gegin, da lavaret d'an aotrou Olier dont aman.

TOUNIK

Ia aotrou, dioc'htu. Ha bennoz Doue d'e-hoc'h.

V DIVIZ

IANN, *e unan*

Nag a labouriou am euz ! Adalek ar mintin, beteg an noz, ne ran nemet paea ha paea. N'euz forz, p'eo gwir va mamm geaz, Doue r'he finnigo, he deuz lezet d'in, war-he-lerc'h, eun tamm brao a beadra. Gwelloc'h kalz eo gan-en dispign eun nebeud arc'hant ha beza eun aotrou, eget ober eur vicher bennag louz diwar ar meaz, tiek, faouter keuneud, pe drouc'her buzug evel va zad.

VI DIVIZ

IANN, OLIER

OLIER

An aotrou en deuz va galvet ?

IANN

Ia, Olier.

OLIER

Edoun o tont ac'hanoun va unan. Eul lizer zo deuet evid an aotrou, eun hanter-heur bennag zo, gand an *telegraf*.

IANN, *souezet*

Gant an *telegraf* ! sac'h an dien ! ro buhan neuze ta. (*Olier a ro, Iann a lenn a vouez huel*). Aotrou Söner, deuit, mar plij, da goania ganeomp hirio, e hostaliri ar Groaz-Wenn. Traou braz e livirin d'e-hoc'h, a berz an aotrou Prefed Kemper. Ho mignoun a greiz kaloun, Alan, segretour ar Prefed. (*Da Olier*). Klevet e peuz mad Olier ? Gant segretour ar Prefed. Hag a laka, e penn diveza al lizer : Ho mignoun a greiz kaloun ! (*Gant eur vouez laouenoc'h c'hoaz*). A greiz kaloun ! (*O krial a bouez penn*). Olier ! Perrik ! Jakou ! Tounik ! Ar c'hemener ! Ar c'hemener ! Peleac'h ema ar c'hemener !

VII DIVIZ

JAKOU, PERRIK, *diredet*. IANN, OLIER

JAKOU

Petra fell dez'han an aotrou ?

PERRIK

An aotrou en deuz hor galvet a bouez penn.

IANN

Ar c'hemener eo am euz ezomm anez-han. N'em euz ezomm ebéd ac'hanoc'h. Petra a fell d'e-hoc'h ?

JAKOU

Netra, aotrou.

OLIER, *d'e vevelien*

Petra a rit aman, neuze, en ho sa, evel daou azen gornek ? It er gegin. (*An daou ne finvont ket. Ema Olier o vont da skei gant-o*). Ac'hanta ! Ac'hanta ! it kuit. (*An daou a ia kuit*).

VIII DIVIZ

OLIER, IANN

OLIER

Va spered zo troet gand ar re ze. Eur paotrik zo oc'h ho kortoz er gegin, aotrou.

IANN

Moarvad. Lez ar paotrik se er gegin. Tounik a fell dez'han dont da vevel gan-en. Ar paotrik a vezo mevel kegin enn e leac'h.

OLIER

Mad. An eil pe egile, ne ran forz. (*Olier a ia e gweled an teatr*). Krial a ra : Jakou ! Jakou !

JAKOU, *er gegin, pell*

Aotrou !

OLIER

Lavar da Dounik dont aman dioc'htu.

JAKOU, *er gegin atao*

Ia aotrou.

OLIER

Mall braz eo d'in, aotrou, mont da aoza ar goan. (*Tounik a zeu*).

IANN

Ia, ia, Olier, kea ta, kea ta. (*Olier a ia kuit*).

IX DIVIZ

IANN, TOUNIK

IANN

Deuz ta va mignounik. Pegement a fell d'id gou-nid peb miz ? Tregont lur ?

TOUNIK

Feiz ! laouen e vezin, a dra zur, gant tregont lur peb miz. Ha petra am bezo da ober ?

IANN

Netra. Lakaad dillad brao, galonsiou aour war-n-ho, ha bale goestad war va lerc'h, evit diskouez mad d'an dud ez oud va mevel.

TOUNIK

Eul labour eaz eo.

X DIVIZ

IANN, TOUNIK, AR C'HEMENER

AR C'HEMENER, *eur pakad dillad gant-han. Dougen a ra ive, enn e zourn, eun tok huel hag eur gala-bouzenn, eur galons aour warn-hi.*

Dale eun tamm am euz great, aotrou, mez ne ket dre va c'hoant eo. Eur bern gwiskamanchou am euz da ober evit tud vraz. Setu ho tillad nevez hag ar re ho mevelik. Ho re, avad, a zo brao kenan, great ma z'int hervez ar c'hiz diveza. Giz roue Bro-Zaoz eo. (*Tounik a azez war eur gador, e zremm war zu an dud*).

IANN

Giz roue Bro-Zaoz ? Perak ?

AR C'HEMENER

Evelse e reer breman. Giz Bro-Zaoz a zo hini eur maread tud a zoare vad. Mes ne ket diez ober enn eur c'hiz all. Abenn daou zervez em bezo great gwiskamanchou all, mar kirit.

IANN

N'eo ket ! N'eo ket ! Ezomm braz am euz da gaout va dillad dioc'htu, kemener. Ne ouzoc'h ket, marteze, kemener, hag e tibrin hirio, diouc'h ar pardaez, gant segretour Prefed Kemper ?

AR C'HEMENER, souezet

Ha ! ha ! n'eo ket fall d'e-hoc'h.

IANN

Gwiskit ac'hanoun. (*Ar c'hemener a wisk Iann. Pa zeo peur-wisket, Tounik o chom azezet atao, a ziroll da c'hoarzin*).

TOUNIK

Ha, ha, ha, ha, ha, ha !

IANN

Petra eo d'id c'hoarzin evelse ?

TOUNIK, o c'hoarzin atao

Ha, ha, ha, ha, ha, ha !

IANN, drouk enn han

Petra eo d'id, eur weach c'hoaz, ober goap ac'hanoun evelse ?

TOUNIK, o c'hoarzin a bouez penn

Ha, ha, ha, ha, ha, ha !

IANN, drouk enn han, o tostaat hag o c'hourdrouz
Tounik

Bremaik me a foueto ac'hanoc'h.

TOUNIK

Ha ha ha ha !... C'houi a zo, ha ha ! C'houi zo... ken... ha ha ! Ken divalo... Ken farsuz... Ken... ha, ha, ha, ha, ha, ha !

IANN, kounnar enn han, oc'h hejal hag o vounta
Tounik

Ha ! Me zo divalo, me zo farsuz ! Lavar adarre ta, lavar ta, kre tignouz ! (*Tounik a c'hoarz atao*).

AR C'HEMENER

Bezit sioul, aotrou, bezit sioul. Gwelloc'h e ve d'eomp lakaat ive e zillad nevez d'ar paotrik se.

IANN

Feiz ! kemener, gwir eo. Gwiskit anezhan ive. (*Ar c'hemener a wisk Tounik gand eur jiletan leun a votounou aour, hag a laka dez'han, war e benn ar galabouzen hag ez euz galons aour var-n-hi. An holl draou ze a zo re vraz evit Tounik*).

AR C'HEMENER

Sellit ta ! Nag hen a zo koant ; eun ealik eo.

IANN, da Dounik

Selaou mad breman, paotr. Me zo ar mestr, ha te a zo piou ?

TOUNIK

Me a zo Tounik.

IANN

N'eo ket. Selaou. Me zo ar mestr, ha te va mevel.

TOUNIK

Ia, mestr.

IANN

Bale war va lerc'h, teir pe beder c'hammed etre-zomp. (*Ober a ra*). Mad. Ha breman kerz war va lerc'h, goestad, evel doun. Mad. (*Iann a gerz, war dro an teatr, oc'h ober e ganfard, e gof eun tamm enn e raok. Tounik a ra ive*).

AR C'HEMENER

Na c'houi a zo brao, aotrou. Nep ho kwelfe a gredfe e ve eur prinz bennag e ve, o vale ker kaer.

IANN

Kemener, va mignoun, c'houi zo eun divinour dispar. Eur maread tud o deuz lavaret d'in ar pez a livirit. Pegement e tleann me d'e-hoc'h ?

AR C'HEMENER

Amzer zo, aotrou, amzer zo. Kenavo.

IANN

Mad. Evel ma kerrot. (*Ar c'hemener a ia kuit*). Olier, Olier !

XI DIVIZ

IANN, TOUNIK, OLIER

OLIER

Petra a fell d'ezhan an aotrou ?

IANN

O vont da di ar barver emañ. Mar teufe unan bennag d'am gwelet, e lavarfes d'ez-hañ choum aman d'am gortoz.

OLIER

Hel lavaret a rin, aotrou. (*Iann ha Tounik a ia kuit, o kerzet kaer, an eil war-lerc'h egile*).

XII DIVIZ

OLIER, e unan

N'euz pennadik ebed da jom sioul gand al labous se. Eat eo kuit. Gwell a ze. Ne glevimp ket e zor-c'hennou keit ha ma vezo er meaz. (*Alan a zeu ebarz*).

XIII DIVIZ

OLIER, ALAN

ALAN

Ho saludi a ran, aotrou. Me a vez great an aotrou Alan ac'hanoun. Me zo segretour kenta aotrou Prefed Kemper.

OLIER, o saludi

Mad, aotrou. C'houi eo hoc'h euz gourc'hemennet eur goan gaer aman.

ALAN

Me eo.

OLIER

N'ho pezo ket a geuz d'hoc'h arc'hant. Dribi mad a reot.

ALAN

Dinec'h oun. Me garfe komz oc'h an aotrou Iann Soner, mar plij.

OLIER

Eat eo er meaz, aotrou. Enn eur redadenn e vezo distro. Azevit eun tamm o c'hortoz. (*Alan a azez. Skei a reer war an nor*).

ALAN

Hen eo, marteze. (*Olier a zigor an nor. Kraban a zeu ebarz ; eur fri sparfel en deuz, hag a zoug eur pakadik marc'hadourez*).

XIV DIVIZ

OLIER, ALAN, KRABAN

KRABAN

Me fell d'in gwelet an aotrou Iann Soner, mar gellan.

OLIER

Ne c'hellit ket avad. An aotrou Soner n'ema ket aman. Azezit aze. Kenavo, aotrounez, kenavo. Labour am euz da ober.

ALAN, KRABAN, *a unan*

Ia, ia. (*Olier a ia kuit*).

XV DIVIZ

ALAN, KRABAN

ALAN

Petra a rez te aman, iuzeo koz ?

KRABAN

Petra a rez te da unan, boed ar gordenn ?

ALAN

Deuet oun da c'hounid eun nebeud arc'hant.

KRABAN

Ha me ive ta.

ALAN

Goulennet e peuz komz oc'h al leue ze Iann Soner. Goulennet am euz ive, hag enn da raok te.

KRABAN

Pep hini a c'hell gounid e vuez. Iann Soner, pa vez meulet awalc'h, a vez mad da baea. Arc'hant en deuz evidomp hon daou.

ALAN

Selaou mad, Kraban. Ne peuz morse nemet traouigou da werza da Iann. Pa vez bihan ar varc'hadourez ar gounid a vez dister. Greomp eur marc'had. Gounid a c'hellez hanter kant lur hirio evit netra. Selaou. Iann a blij d'ez han an diotachou great gant kartou. Lavar d'ez-han e peuz gwelet dre ar c'hartou, e teuo aman hirio, kent an noz, eur roue pinvidik bennag, karget a vadou a bep seurt evit han.

KRABAN

Ha goude neuze ? ne zeuio roue ebed.

ALAN

Eo, eo. En em glevet am euz great gant Jobik, eul louarn finoc'h c'hoaz eget hon daou. Dont a raio aman da goania, e zremm duet mad, dillad eur roue morian war-n-han. Er c'hiz ze e tennimp euz e c'hodell da Iann eun tamm brao a liardou. (*O rei arc'hant da Graban*). Dal ! Setu pemp lur warnugent. Mar bez great mad an taol, kemend all az pezo.

KRABAN

Mar d'oud goest da denna kalz a arc'hant digant han, ne ket awalc'h d'in hanter kant lur. Me fell d'in kant lur da nebeuta.

ALAN

Great ar stal. (*Rei a ra an arc'hant da Graban*).

IANN, *er meaz, o krial*

N'ez euz deuet den, d'am gwelet, Olier ?

ALAN *da Graban*

Buhan, buhan ! Iann eo o tont enn dro. Kea da guzat ta, kea buhan ta. (*Kraban a ia kuit gant e bagadik marc'hadourez*).

XVI DIVIZ

ALAN, IANN

ALAN

Me ho salud mil ha mil gweach, aotrou. Goulennet am euz diganehoc'h ma ve ho madelez koania hirio ganeomp diwar goust an aotrou Prefed Kemper, ma z'oun e zegretour kenta.

IANN

Gant plijadur vraz, aotrou, mes perak e teu d'in me an enor ze a berz ar Prefed ? N'anavezan ket anezhan, me.

ALAN

Mad. Mes hen hoc'h anavez mad. Klevet en deuz hano ac'hanoc'h gand an aotrou Gwennik, *député*. Rak se pa zavo c'hoant gan-e-hoc'h da gaout eur garg vraz bennag, ne vezo ket diez he rei d'e-hoc'h.

IANN, *laouen*

Ha pe seurt karg ?

ALAN

Kargou a bep seurt ; rener eun dra bennag, n'euz forz, rener marc'had ar pesked, pe rener marc'had al louzou, ha me a oar me ? Ar pezh a gerot. Rak se ho pedet am euz da zribi ganeomp hirio, ma c'hellimp komz etrezomp, evid ar gwella, ouc'h taol, war gement se.

IANN

Mil bennoz Doue d'e-hoc'h, aotrou. Kenavo e berr, da goania. (*Alan a ia kuit*).

XVII DIVIZ

IANN, *e unan, lorc'h braz enn-han*

Pebez taol chans ! Pegen talvouduz, pegen du-diuz eo beva. etouez an dud vraz ! Ar re zister hag a zo berr o spered, ne zebront ket gant segretourien ar Prefed.

An dud keiz se ne vezont lekeat biken da ren n'euz forz petra, marc'had ar pesked, pe varc'had al louzou, ha me a oar me ? Va spered n'en deuz peoc'h ebed. (*Kraban a zeu*).

XVIII DIVIZ

IANN, KRABAN

KRABAN

Ra vezo warn-oc'h, aotrou ker, levenez ha iec'het.

IANN

Ha warn-oc'h, aotrou Kraban. Petra zo a nevez gan-e-hoc'h ?

KRABAN

Kalz ha kalz traou braz.

IANN

Kalz a draou braz ?

KRABAN

Ia ta, ha ne goustint ket ker d'ho kodell, pinvidik evel ma-z-oc'h.

IANN

Diskouezit.

KRABAN, *o tigeri e bagadik*

Da genta eul leorik talvouduz braz. Sellit oc'h e hano : *Alc'houez nevez an huvreou*. Eul leor dispar eo, ha ne ket evit ar c'heginerezed eo, ez eo bet

skrivet, mes evit ar vourc'hizien wizek. N'euz forz petra a huvreot epad an noz, epad an deiz zoken, al leorik se a zisplego hoc'h huvre raktal ha neat.

IANN, *souezet*

Raktal ha neat ? Ni a welo. Huvreet am euz, hed an noz, ez oa va fenn leun a laou.

KRABAN, *o klask el leorik*

Laou... laou... laou... ha ! Kavet em euz. (*O lenn*) an hini en deuz bet eun huvre diwar benn al laou, hennez a zigouezo gant han leun a arc'hant hag a aour, hep dale.

IANN

Sac'h an dien, ne gredan ket.

KRABAN

Sellit, c'houi hoc'h unan.

IANN, *o lenn*

Moulet eo, moulet eo ; rak se gwir eo. Pegement al leorik ?

KRABAN

Dek lur, evidoc'h.

IANN

Her prena a ran.

KRABAN

Eun dra all am euz hag a zo eun dra vuzuduz.

IANN

Petra eo ?

KRABAN, *o kemeret enn he bagad eur gordenn hir ha louz*.

Setu ; ar gordenn ze eo.

IANN

Ha neuze ta ? Eur gordenn goz ha louz n'eo ken.

KRABAN

Koz ha louz ? Ha n'ouzoc'h ket, avad, pegen talvouduz eo ar gordenn ze. Hounnez a zo bet oc'h-penn pevar mil vloaz zo, o staga saout hon tad koz Abraham. Heman o vervel, en deuz lezet anezhi war e lerc'h da Izaak, ha Izaak da Jakob, ha Jakob da unan euz e zaouzek mab, hag hennez n'ouzoun ket da biou. Evelse, nebeud a nebeud, ar gordenn venniget zo deuet beteg va zad koz, va zad, ha me. Eur gordenn er c'hiz se, bet etre daouarn kement all a dud santel ha brudet, en deuz eun dalvoudegez dispar hag a ro chans vad d'an hini e ve gant han.

IANN

Mar d'eo ken talvouduz ar gordenn ze, perak ta e werzit anezhi ?

KRABAN

N'oun ket ker sod ken nebeud. (*O tiskouez eur gordenn all*). Eur penn anezhi a viran, evidoun va unan, ha ne vezo gwerzet morse da zen ebed, er bed ma.

IANN

Roit. (*Kraban a ro al leorik hag ar gordenn da Iann*). Pegement am bezo da bae ?

KRABAN

Al leorik, dek lur ; ar gordenn hanter kant lur. An dra ze a ra tri ugent lur, mez evidoc'h hag evidoc'h hepken, e roin, evit netra, eun dra all.

IANN

Livirit.

KRABAN *o komz evel eur profed*

Er mintin ma da zek heur araok kreisteiz, am

euz bet sonj ac'hanoc'h. Mad, emezoun me, klas-komp petra a c'hoarvezo a euruz gant va mignoun karet Iann Soner ? Roue treflezen en em ziskoueze d'in atao, atao hag atao, kaer am boa meski ha kemmeski ar c'hartou.

IANN

Ha petra a zeu digant eur roue ar seurt se ?

KRABAN

Petra ? Roue an eurusded eo. Ha pe seurt liou eo an dreflezen ?

IANN

Du avad, du pod.

KRABAN, *a vouez huel*

Sellit piz, neuze oc'h tri zra : da genta Iann Soner, d'an eil, eur roue, d'an drede al liou du ! Me a lavar d'e-hoc'h ez euz eur roue bennag, n'ouzoun ket peleac'h, mes n'ema ket pell diouzomp. E groc'henn a zo du evel diou askell ar vran, pe evel al ludu du.

IANN

Hag e welin anezhan ?

KRABAN

Her c'hredi awalc'h a ran, avad.

IANN, *o paea Kraban*

Mad. Setu ho tri ugent lur.

KRABAN

Bennoz d'e-hoc'h, ha chans vad. (*Kraban a ia kuit*).

XIX DIVIZ

IANN, TOUNIK

IANN, *e unan, o lakaad al leorik hag ar gordenn war an daol*

Setu me va unan evit eur pennadig ; vad a rafe d'in diskuiza eun tamm. Va spered zo skuiz, ha va c'horf ive. Azezomp. (*Iann a azez*).

TOUNIK, *o tont*

Eun den a zo aze o c'houlenn komz ouzoc'h.

IANN

Pe seurt doare en deuz ?

TOUNIK

Eur zae gaer meurbed a zo warn-han, ha war e benn eun tok huel, alaouret mad. E groc'henn a zo ken du ha toull ar ziminal.

IANN, *laouen braz*

Hen anaout a ran, Tounik ; roue an eurusded eo. Kea da lavaret d'ezhan dont aman. (*Tounik a zigor an nor. Jobik a zeu ebarz, gwisket e giz eur roue euz ar zao-heol, duet mad e zremm. Dougen a ra eur vedalenn ruz, braz evel eun asied, eun houad aour livet warn-hi. Ar vedalen a zo a istribill ouz e c'houzouk, gand eul las ruz*).

XX DIVIZ

IANN, TOUNIK, JOBIK

JOBIK, *o saludi*

Me ho salud, aotrou, hag a ginnig d'e-hoc'h va gourc'hemennou ar gwella.

IANN, *o saludi*

Me ho salud ive, roue braz; roue an eurusded
m'emaoun e c'hortoz.

JOBIK

N'oun ket roue, aotrou; me zo kannad eur roue
pinvidik ha netra ken. Pedet oun bet da zont da
goania aman gant va mignoun, an aotrou Alan,
segretour Prefed Kemper.

IANN, *souezet*

An aotrou Alan? Hennez zo mignoun braz d'in
ive; mar kirit, me a lavaro dezhan dont aman.
Tounik, kea d'e gerc'hat dioc'htu.

TOUNIK

Ia aotrou. (*Tounik a ia kuit*).

XXI DIVIZ

IANN, JOBIK

IANN

Azezit aze, aotrou kannad, o c'hortoz Alan da
zont. (*Jobik a azez*) Ha pell e chomot e Brest?

JOBIK

Eun nebeud amzer hep ken. Da Baris ez in, kaset
gant va roue, da welet an aotrou Prezidant ar
Republik.

IANN

Ha! ha! (*O sellet war zu ar meaz*). Setu Alan o
tont; n'eo ket bet pell.

XXII DIVIZ

IANN, JOBIK, ALAN

ALAN, *oc'h ober lid da Jobik*

Ha! c'houi eo, va mignoun karet! Plijadur vraz

am euz oc'h ho kwelet. (*O tiskouez Iann*). Setu aze
unan euz va brasa mignouned, eun den hag a zo
lemm e spered; an aotrou Iann Soner eo.

JOBIK, *oc'h ober eul lamm, gant neuze da veza
souezet neal*

Petra a livirit, va mignoun ker, petra a livirit?
Daoust hag am euz klevet mad, pe me a zo bouzar?
Pe hano en deuz an aotrou kalounek ma?

ALAN

Soner, evel e dad hag e dad koz.

JOBIK, *souezet neal atao*

Soner! Soner! Hano va roue eo, hano roue enez
vraz Honolulu, enn tu all d'ar bed. Roue enez vraz
Honolulu a vez great Paol Soner anez-han. (*Alan
a ia pelloc'h, a azez hag a gemer gazetennou, oc'h
ober neuze da lenn. C'hoarzin a ra goestad, peb
enn amzer, o sellet ouz an dud*).

IANN, *souezet braz, d'e dro*

Aotrou ministr, fazia a rit a dra zur. Paol Soner
a oa va eontr benniget, breur va zad, mes n'eo ket
bet roue biskoaz, ha ne vezo ket da viken. Eur
martolod n'oa ken, bet beuzet, dek vloaz zo, gand
e lestr, enn tu all d'ar bed.

JOBIK

Just avad, evel hel livirit. Hoc'h eontr benniget,
lounket gand ar mor braz, ne jomaz ket eno da
varc'hata. Hoc'h eontr a oa nerzuz e zivreac'h hag
e zivesker. Ne ket ta?

IANN

Nerzuz braz, a zonj d'in.

JOBIK

En em lakaad a reaz da neuvi ha da neuvi buhana
ma c'helle.

IANN

N'oun ket souezet. Va contr Paolik a neuve evel eur c'hi-vôr.

JOBIK

Gwir eo, feiz ! evel eur c'hi-vôr. Eun heur hanter goude, en doa paket an douar, ha pe seurt douar ? Douar enez Honolulu. Ar roue koz a ioa o paouez mervel. Hoc'h contr a oe lekeat da roue, p'eo gwir n'oa den ebed, eno, nemet han o c'houzout lenn ha skriva.

IANN

Souezet maro oun. Evel se, avad, va contr n'eo ket maro, evel a greder.

JOBIK

Maro ? ken iac'h eo ha me. Ne c'hellomp ket en em fazia, tamm ebed. Eaz eo her c'houzout. E zaoulagad oa... oa... penaoz ta ? me a oar, koulskoude.

IANN

E zaoulagad a oa dispourbellek ha glaz.

JOBIK

Just ! just ! dispourbellek ha glaz, hag e vleao a oa hir ha du.

IANN

Hir ha ruz !

JOBIK

Hir ha ruz, ia, ia, ruz, ia ruz flamm. Hen eo, hen eo, hep mar ebed ; selaouit adarre. Penaoz me, morian paour, ginidik euz a Honolulu, penaoz me a c'hellfe komz eur brezounek ker iac'h ha ker sklear, nemet abalamour am euz desket ar iez brao ze gant hoc'h contr ? Penaoz ta ? Penaoz a gav d'e-hoc'h ?

IANN

Gwir eo, evelato.

JOBIK

Hag eul levenez euz ar re vrasa a zo enn oun, da genta da veza restaolet eun contr mad d'e niz, ha d'an eil evit ar blijadur am euz da rei d'e-hoc'h eun enor dispar.

IANN, *laouen*

Eun enor dispar ?

JOBIK

Dispar ! (*o c'hervel Alan*). Alan, va mignoun.

ALAN, *o sevel*

Petra ?

JOBIK

Ha gwir eo, ez eo, an aotrou Iann Soner, eun den fur ha gwiziek, evit mad ?

ALAN

Evit mad. Me a ro va ger d'e-hoc'h.

JOBIK

Ar vedalenn gaer ze a welit a istribill oc'h va gouzouk, me a rankje he rei da Brezidant ar Republik. Eun all e c'houlennin evit han digant va roue. Mez hounnez, perag ta ne rofen ket anezhi d'an aotrou Soner, niz ar roue ?

IANN, *levenez braz enn han*

An enor ze a zo re vraz evidoun, aotrou ministr.

JOBIK

N'eo ket, n'eo ket. (*Lakaad a ra ar vedalenn enn dro d'e c'houzouk, da Iann*) Medalenn urz an Houad Aour eo, an urz vrasa a zo e enezenn Honolulu. Ne roomp biskoaz an *houad aour* nemet d'ar rouaned, pe d'an dud vraz meurbed.

IANN

Mil ha mil trugarez d'e-hoc'h, aotrou ministr.

JOBİK

Ar mizou n'int ket gwal vraz. Mil lur eo evit ar medalennou braz. Hounez avad zo unan vihan. N'ho pezo nemet pemp kant lur da baea.

IANN, *o vont d'e c'hodell hag o paea*

Ar c'henta ar gwella. (*D'an dud*). Ne ket re ger, kement all a c'hoant, am euz, pell zo, da gaout eur vedalenn bennak. (*Olier a zeu*).

XXIII DIVIZ

IANN, ALAN, JOBİK, OLIER

OLIER

Koan an aotrounez a zo lekeat war an daol.

ALAN

Gwell a ze. Naoun du am euz.

JOBİK

Ha me ive avad. (*Da Iann oc'h e saludi meur a weach*). It araozoun, aotrou Soner, it araozoun, (*Iann a ia. Dre an tu all d'an teatr, neuze, eun toullad mevelienigou kegin a zeu er zal, hag a gan, a unan.*

XXIV DIVIZ

SON AN AOTROU FLAMMIK⁽¹⁾

War don gallek : *C'est la mère Michel*

AR VEVELIENIGOU

Setu Otrou Flammik, gwisket flamm, gwisket kaer
Ne ked mui eur mesiad, ne ked c'hoaz eur pôtr ker.
Sellid he ben toused, toused gant ar c'hrevier
N'en deuz ked bleo hir, n'en deuz ked bleo berr.

(1) Savet gand hor barz brudet A. Brizeux, e brezounek Kerne.

Dond a ra euz ar skol, klevomb holl he bresek
Ne ked mui brezonek ha ne ked c'hoaz gallek.
Fougheer ha direiz, war beb dra grog he zent :
Goab a ra war an diaoul, goab a ra war ar zent.

*Olier a zeu ebarz, eur skubelenn gant han. Ar
vevelienigou ne welont ket anezhan.*

Hanter-vad, hanter fall, setu Otrou Flammik,
Allas ! ann oanig gwenn a zo deud eul louarnik.
Setu Otrou Flammik, gwisket flamm, gwisket kaer,
Ne ked mui eur mesiad, ne ket c'hoaz eur pôtr ker.

XXV DIVIZ

AR VEVELIENIGOU, OLIER

OLIER, *rust e vouez*

It kuit, it er gegin buhan, sac'had kornandouned.
(*Ar vevelienigou ne finvont tamm. Olier a red
war-o-lerc'h, e skubelenn savet*).

It buhanoc'h ta, it kuit ta. (*An holl a ia huit o
redek.*

Ar goel a zisken



EIL ARVEST

KENTA LODEN

*Kambr Iann, e hostaliri ar Groaz-Wenn.
Kadoriou. A zeou eur ziminal, eur c'hlo-
c'hik warn-hi.*

KENTA DIVIZ

*Iann, e unan, a gousk war eur gador, e fri ruz
awalc'h. Roc'hal stard a ra, hag oc'h horjella a
gleiz hag a zeou, a gouez d'an douar. Dihuna a ra,
hag o chom azezet, atao, war an douar, a zell oc'h
an dud.*

IANN

Mil diaoul an ifern ! Kredi a ran awalc'h em euz
evet eur banne stard a win, deac'h da noz, gant va
mignouned. Poan em euz em fenn, ha ne ket
souezuz ; torret eo gant kemend all a draou ! (*Olier
a zeu*). Ha c'houi eo, aotrou segretour ?

II DIVIZ

IANN, *atao azezet war an douar.* OLIER

OLIER

Savit, aotrou, ha kemerit ho traou da vont kuit.
Ne c'hellan ket rei lojeiz d'e-hoc'h, em zi, pelloc'h
amzer.

IANN, *azezet atao war an douar*

C'houi a gas ac'hanoun kuit.

OLIER

Ia avad, mez araok e c'houlennin digant an aotrou eun nebeudig arc'hant dleet d'in. (*O tenna euz e c'hodell eur paper gwen.*) Setu ar paper, aotrou.

IANN, *divezvet enn eun taol, o sevel hag o lenn*

Kambr an aotrou epad daou miz, nao ugent lur. Dijuniou, leiniou ha koaniou, epad daou miz, pevar c'hant ugent lur. Goulou, epad daou miz, tregont lur. Fest vrag, roet deach d'an noz gand an aotrou, kant lur. (*O komz da Olier, drouk enn-han.*) Kousket a rez, a gav d'in. Ha piou en deuz gour-c'hemennet ar goan-ze? Ha me eo? Pedet oun bet da goania gant segretour ar Prefed, hostiz fall ha displeal.

OLIER

Lennit adarre.

IANN, *o lenn*

Seiz asied ha nao gweren torret gand ar morian, deuët da veza laouen gand ar banneou : c'houec'h real war-n-ugent. (*Gant kounnar.*) Petra adarre? Mar deo bet torret da draou gand ar morian, ne ket me eo, sac'h an dien, hag am euz torret anezho.

OLIER

Marteze, mez an dud se zo eat kuit ha c'houi a zo chomet. Paea a reot evid ar re ze, evel just. Lennit adarre.

IANN, *o lenn*

Tok an aotrou Gwegan, mantel an itroun Kéré, ialc'h an dimezel Tuzal, laeret gand an hini hanvet segretour ar Prefed; an tok pevar skoed, ar vantel ugent skoed hag ar pezh a ioa er ialc'h, eur skoed ha pevar ugent lur. (*Kounnaret neat, hag o vounta Olier.*) Laer! den fall! den digaloun. Ha me a rank, me, paea ar pezh zo bet laeret gant re all? (*O kemeret eur vaz, hag o c'hourdrouz Olier.*) Kea

kuit, buhana ma c'helli, ma ne fell ket d'id beza lazet a daoliou baz. (*Olier, spountet, a ia kuit.*)

III DIVIZ

IANN, *e unan, o sellet oc'h paper gwenn Olier*

Enn holl, eiz kant unnek ha pevar ugent lur ha dek kwennek. Na spountuz eo kement se! ha n'em euz ket eun diner toull em godel. Penaoz e paein? D'ar prizoun ez in. (*O wela.*) Pegen reuzeudik oun me! N'em euz ken mui nemet mervel, breman, avad. Ia! ia! mervel! (*Gwela stank a ra*) Hi hi hi!... (*O komz ouz an dud.*) Sellit ouzin eur weach c'hoaz. Me ar paotr fin, hi hi! me an den gwiziek, hi hi! me moumoun an dimezellet, hi hi. (*Tounik a zeu ebarz goestad.*) Emaoun o vont da vervel. (*O sellet war zu an dud.*) Kenavo, tud vad, ne welot mui ac'hanoun.

IV DIVIZ

IANN, TOUNIK

IANN

Petra a fell d'id, va mignounik ker?

TOUNIK, *spountet*

Klevet am euz an aotrou Olier o lavaret da Jakou : kerz buhan, Jakou, kea da gerc'hat an archerien ha lavar d'ez-ho dont aman dioc'htu.

IANN

Ne ran forz ebed anezho, Tounik. Petra eo an archerien, ar varnerien, ha n'euz forz piou d'eun den hag a zo tostik tost d'ar maro? Emaoun o vont da vervel, Tounik; (*O wela stank*) ia, Tounik. (*O poka d'ezhan.*) Kenavo, va moutik, kenavo! (*Iann a ia kuit.*)

V DIVIZ

TOUNIK, *e unan. Sellet a ra eun tamm ouz an dud, hag en em laka da wela dourek ha da vlejal evel eul leue.*

Heu!... Heu!... va mestr, va mestr! hag a roe d'in kemend all a draou mad, gwiskamanchou alaouret, souben druz... kik lard... tregont lur peb miz... heu heu!... heu heu!... va mestr! va mestr muia karet... Da beleac'h ez in me?... Petra rin-me? Heu! heu!... Me zo evel eul leue bihan hag a zo maro e vamm. Heu... Heu...

VI DIVIZ

TOUNIK, JILEZ, KOLAZ

KOLAZ

Petra eo d'id hirvoudi evelse mignounik?

TOUNIK

Va mestr a zo maro.

JILEZ

Da vestr a zo maro? Piou da vestr? Olier?

TOUNIK

N'eo ket. Iann Soner eo.

KOLAZ

Hag her gwelet e peuz o vervel?

TOUNIK

N'em euz ket. Mez maro eo evelato. Eat eo enn tu ze, n'ouzoun ket peleac'h.

JILEZ

Evid en em laza eo, sur. Miromp out-han, Kolaz.

KOLAZ

Ia, Jilez.

TOUNIK, *o sellet war zu ar meaz*
N'eo ket red; setu hen.

VII DIVIZ

JILEZ, KOLAZ, TOUNIK, IANN, *e zremm tenval.*
Tounik a azez pelloc'h, war eur gador, e vou-
chouer war e zaoulagad, da wela.

JILEZ

Piou oc'h?

IANN

Iann Soner.

TOUNIK, *o vlejal*

Heu... Heu...

KOLAZ

Ha c'houi a zo savet c'hoant gan-e-hoc'h da vervel?

IANN

Ia.

TOUNIK, *o vlejal*

Heu... Heu...

JILEZ

Perak e teuit enn dro neuze?

IANN

Pa vezer fur eveloun, e ranker skriva e destamant, araok mervel. Tounik, kea da gerc'hat paper gwenn.

TOUNIK

Ia aotrou. (*Tounik a ia kuit*). Heu... Heu...

VIII DIVIZ

IANN, KOLAZ, JILEZ

KOLAZ

Ne varvot ket ; ni a viro ouz-oc'h.

IANN, *a vouez huel*

Selaouit. Segretour Prefed Kemper a zo eul laer.
(*Gant kounnar*). Krogit enn-han. Klaskit an tok,
ar ialc'h hag ar vantel.

JILEZ, *souezet mad*

Petra ta ? Petra ta ?

IANN, *a vouez hueloc'h*

Ar morian ne ket eur morian eo. Paolik Soner,
va eontr, a zo maro, ha n'eo ket bet roue tamm
ebed. Krogit er morian.

KOLAZ

Pe seurt morian ?

IANN

Honolulu. Krogit enn-han.

KOLAZ

Jilez ! eur paour keaz foll eo. Abalamour d'ezhan
eo en deuz galvet Olier ac'hanomp. Ro skoaz d'in
ma c'hellimp her paka. (*Ema an daou archer o
vont da gregi enn han*).

IANN, *gant kounnar*

Va list me, archerien fall ! me zo iac'h, nemet
n'am euz eun tammik poan vleo gand ar banneou
em boa evet deac'h. Ha me am bije aoun raz-oc'h ?
Ho la la ! Goustadik ; kordenn ar chans vad zo
gan en. Gortozit. (*Mont a ra da gerc'hat e gor-
denn, e tireten an daol*).

JILEZ

Kolaz ! Kolaz ! Sell ta ! Ar gordenn a zo gant-han
a vezo mad. (*En em ganna a reont o zri, en eur
grial mad, An archerien a gemer kordenn Iann
hag a stag anezhan war eur gador, o starda mad
ar gordenn a dre ar gador ; divreac'h Iann n'int
ket liammet evelato*).

IX DIVIZ

AN HEVELEP RE, OLIER

OLIER

Dalc'hit mad ar ribler ze m'emaoc'h o kregi
enn-han, ha taolit anezhan er prizoun.

KOLAZ

Er prizoun ? e nep kiz ; enn hospital, ne lavaran
ket. An den ze zo foll, ha foll mik.

IANN

Ne ket gwir.

OLIER

Foll ! tam ebed ; mignoun al laeroun eo. N'eo ket
ker sod hag her c'hredit.

JILEZ

Roit peoc'h d'eomp, aotrou Olier. Ni zo tud a
lezenn. Anaout mad a reomp hor micher.

OLIER

Deac'h da noz...

KOLAZ

Peoc'h ! eur weach c'hoaz, pe ni a welo. Klevet a
rit ?

OLIER *spountet*

Ia.

JILEZ

Ha ne ket echu al labour gan-ehoc'h ! O vont da di ar barnier ha da di ar c'homizer emaoamp, da gaout an aotre da lakaad Iann Soner e hospital an dud foll.

IANN, *o skei e dreid enn douar*
Ne fell ket d'in, ne fell ket d'in.

KOLAZ, *da Olier*

C'houi eo hag a ranko dere'hel kount euz ar pezh a raio ar paour keaz se.

JILEZ

Taolit evez mad out-han. Riskluz braz e ve da leuskel ar rumm tud se da vont kuit. Taolit evez.

OLIER

Hen ober a rin. (*An archerien hag Olier a ia kuit*).

X DIVIZ

Iann e unan, a zell ouz ar gordenn. Lakaad a ra e zaouarn, adre e gein, da zistaga ar gordenn. Tripal a ra gand e dreid war an douar. Ne c'hell ket ober tra.

IANN, *drouk enn-han*

Kre kordenn villiget ha daonet. Evit hi da veza koz, kaletoc'h eo eget lost an diaoul. (*Tripal a ra*). Perak ta n'oud ket chomet, gweach all, gant saout Abraham, Izaak ha Jakob ? Gwelloc'h kalz e vije bet d'in. (*Tripal a ra adarre*). Tounik ! Tounik ! Den ebed. Tounik ! Ne respount tra. Deuz buhan ta, ginou tarte ! Tra. Ne glev ket ac'hanoun marteze. (*O sellet ouz ar c'hloc'hik, war ar ziminal*). Sell ta, sell ! Ma c'hellfenn kregi er c'hloc'hik brao ze, Tounik am klevje gwelloc'h, a gav d'in. (*Mond*

a ra kammik-kam, staget atao oc'h e gador, beteg ar ziminal, hag a grog er c'hloc'hik. Seni a ra). Tounik ! Tounik ! N'ema ket. (*Seni a ra*). Tounik ! Hast affo ta ! (*Seni a ra*). Tounik ! (*Tounik a zeu, paper gwenn enn e zourn*).

XI DIVIZ

IANN, TOUNIK

TOUNIK

Setu paper gwenn evid ho testamant, aotrou.

IANN

N'em euz mui ezomm. Laka an dra ze war an daol. Mad ; deuz buhan d'am distaga dioc'h ar goz gador ze.

TOUNIK

Aoun am euz ; an archerien o deuz miret ouzin ho tistaga.

IANN

Goap a ran euz ar re ze, me. Gant piou ez oud mevel te ? Gant piou ez oud paeet te ? Gan-en pe gand an archerien ?

TOUNIK

Gan-e-hoc'h, aotrou.

IANN

Mad. Deuz d'am diliamma, neuze, ha buhan.

TOUNIK

Ia aotrou. (*Distaga a ra Iann dioc'h e gador*).

IANN, *o tenna e alan*

Ne ket re abred, stardet evel ma z'oan. Va selaou mad. Kea buhan da di an aotrou Strakell, alvokad, o chom war dachenn varc'had Sant Loïz, tost da staleur c'higer. Te a oar mad ?

TOUNIK

Ne ouzoun ket, aotrou.

IANN

Goulenn a ri. Kea buhan da gerc'hat anezhan.
(*Klevet a reer moueziou Kolaz ha Jilez o komz
huel er meaz*).

KOLAZ, *er meaz*

Deuz ta Jilez, deomp da gaout Olier.

JILEZ, *er meaz*

Ia Kolaz, ia.

IANN, *strafilet braz*

Ne fazian ket ! Ar re ze eo adarre. Archerien an
diaoul ! Anaout a ran anezho dioc'h o moueziou
raoulet. Mil tan foultr ! Re zivezad eo da dec'het
kuit. Sell ! ar ziminal ! (*O c'hoarzin*). Ha ha ha !
Tounik, lavaret a ri ne ouzot ket da beleac'h oun
eat.

TOUNIK

Ia, aotrou. (*Iann en em guz er ziminal. Kolaz
ha Jilez a zeu er gampr*).

XII DIVIZ

KOLAZ, JILEZ, TOUNIK

KOLAZ

Kurun ruz ! An hini foll zo eat kuit. (*Da Dounik*).
Hé paotr ? Peleac'h ema an den a ioa aman ?

TOUNIK

Pe seurt den ?

JILEZ

Da vestr, an hini a zo troet e spered.

TOUNIK

E spered ?

KOLAZ, *o c'hourdrouz*

Diwal, Tounik, diwal. (*Gand eur vouez flour*).
Kleo ta, va c'halounik, kleo. Lavar d'eomp ha
serret mad oa an nor ?

TOUNIK

An nor ? Pe seurt dor ?

JILEZ, *drouk enn-han*

Awalc'h ! Serr da veg, louarnik, ha kerz buhan
da gerc'hat Olier.

TOUNIK

Ia, aotrou n'archer. (*Tounik a ia kuit o redek*).

XIII DIVIZ

KOLAZ, JILEZ

KOLAZ

Petra raimp breman, Jilez ?

JILEZ

Petra raimp Kolaz ? An aotrou Keravel, medisin,
pa zeuio aman bremaik, da welet Iann, ne gavo
den.

KOLAZ

Ne ket an aotrou Keravel eo a zeuio ; an aotrou
Salaun eo.

JILEZ

Petra ta ? Goulennet e peuz te ive eur medisin ?
Piou en deuz lavaret d'an aotrou Salaun dont
aman ?

KOLAZ

Ar c'homizer, dre va lavar. Ha piou a gas an
aotrou Keravel aman ?

JILEZ

Ar barner, dre va lavar ive.

KOLAZ

En em glevet mad a raint an daou ze ?

JILEZ

En em glevet mad awalc'h a raint pa n'o deuz netra da ober, an hini klanv o veza eat kuit. Sell, setu Olier o tont.

XIV DIVIZ

KOLAZ, JILEZ, OLIER

KOLAZ

Perak ho peuz kaset Iann Soner er meaz ?

OLIER

N'em euz ket. Eat eo kuit hen e unan.

JILEZ

Mad. En em glevet a reot gand ar barner. Deomp Jilez, deomp buhan e kear, da glask e pep leac'h, tu ma, tu hont, an hini dianket. (*Kolaz ha Jilez a ia kuit*).

XV DIVIZ

OLIER, e unan

Awalc'h am euz, avad, pell zo, gant an abadennoù a bep seurt a gouez warn-oun, deiz ha noz. Iann Soner n'ema mui aman. Doue r'hen bennigo ! An nebeud arc'hant dleet d'in a vezo kollet, m'oarvad, mes peger sioul e vezin me breman ! Kenavo, Iann genaouek, ha kenavo d'e-hoc'h, ive, tud fall, laeroun, riblerien, morianed hag ar re all. (*O sellet war zu ar meaz.*) Sell ! Piou eo hennez o tont ?

XVI DIVIZ

OLIER, FANCH

FANCH

Me am euz c'hoant, aotrou, da gomz ouz an aotrou Olier, hostiz an hostaliri ma.

OLIER

Me eo, aotrou.

FANCH

Livirit d'in, mar plij, ha n'ho peuz ket roet lojeiz, eur pennad amzer zo, d'eun den iaouank, Iann Soner e hano.

OLIER

Eo, aotrou. Hennez, hag a jome aman, zo eat kuit, er mintin ma, n'ouzoun ket peleac'h. Tud zo hag a lavar eo foll. Ne gredan ket kalz, me, e ve foll.

FANCH

Allaz ! Ne venn ket souezet, me, e teufe da veza foll, ar paour keaz se. Me zo e dad, hag am euz digant-han kalz a enkresiou, glac'harou ha trubuilhou. Ne ran nemet diluia kudennoù atao, gant han. C'hoant en deuz bet da zavel a labourer douar da vourc'hiz. E benn a zo leun a ziotachou a bep seurt. Gwelloc'h kalz e vije bet d'ezhan, choum gan-eomp da labourat douar Kerfeunteun e Lanrivoare.

OLIER

Evid e gerc'hat eo, ez oc'h deuet.

FANCH

Ia ta, evid e gas enn dro ganen, da Lanrivoare, mar gellan.

OLIER

Mar gellit, ia, mar gellit ; poan ho pezo, war va mennoz. An archerien a red war e lerc'h ; pa vez

unan bennag paket gand ar re ze, diez eo e denna euz o daouarn.

FANCH

Mad. Hag an alvokaded ? Daoust ha labourat a reont evid ar chas ? Me garfe klevet digan-e-hoc'h hano eun alvokad fur. Ne ran ket forz pegement e baea.

OLIER

Anaout a ran unan mad kenan. Hen a zo an aotrou Meliz e hano. Choum a ra er ru vraz, e korn ru an ti-kear.

FANCH

Bennoz Doue. Mont a ran d'e gaout. (*Fanch a ia kuit*).

XVII DIVIZ

OLIER, SALAUN

OLIER

Petra a fell d'e-hoc'h, aotrou ?

SALAUN

Kaset oun gand ar c'homizer da welet an hini klanv a zo o choum er gambr ma. Bezit dinec'h, va mignoun, n'bo pezo droug ebed gan-en. Penaoz emaoch ?

OLIER

Fazia a rit, aotrou ; ne ket evidoun me eo ez oc'h bet galvet, mez evid eun all hag a zo eat kuit.

SALAUN, *d'an dud*

Paour keaz ! holl int evelse. Ar re foll a lavar atao : Me klanv ? Me klanv ? Kea ta ! Paour keaz ! (*Da Olier*). Poan benn a zo kroget eun-hoc'h, ha ne ket ta ?

OLIER

Va fenn me a zo ker iac'h hag hoc'h hini c'houi. (*Skei a reer*). Piou zo aze ?

SALAUN

Chomit sioul. D'in me eo da zigeri. (*Salaun a zigor an nor*).

XVIII DIVIZ

OLIER, SALAUN, KRAVEL

SALAUN

Perag e teuit aman, aotrou Kravel ?

KRAVEL

Perag ? A berz an aotrou barner eo e teuann.

SALAUN

Sellit ta ! ha me a berz an aotrou komizer.

KRAVEL

Dont a ran da welet eun den, e spered troet, koulz lavaret. Choum a ra er gambr ma, dioc'h a leverer.

SALAUN, *o tiskouez Olier*

Gwir eo. Setu hen.

KRAVEL, *da Olier*

Mad. Sellit piz ouz-in, va mignoun, ma welin ha n'oc'h ket lagad-treuz.

OLIER, *droug enn-han*

Lagad treuz c'houi hoc'h unan. Hel lavaret am euz d'egile. An hini klanv n'ema ket aman.

KRAVEL, *o c'hoarzin*

Goestad, goestad ! Evit ho parez eo ez omp deuet, ha ne ket evit an hini eat kuit. Diskouezit ho teod d'in.

OLIER, *drouk braz enn-han*

It kuit er meaz dioc'htu, boed ar gounnar, tan foeltr ar vedisined.

SALAUN

Klevet a rit, Keravel ; drouk komzou, gaou, dismegansou, gwal hanoïou ! Eur c'hlanv, pa vez o kroza ar vedisined er c'hiz se, a vez gwal glanv, avad. (*Olier a fell dez'han mont kuit. An daou vedistin a vir out-han, o terc'hel mad anezhan*).

OLIER, *o krial a bouez e benn*

Pèrrik ! Jakou ! Jakou ! Pèrrik ! Deuit d'am skoazia ; deuit d'am c'hennerza ! Buhan, buhan.

KERAVEL

Peoc'h ! peoc'h.

OLIER, *dalc'het stard atao gand ar vedisined*

Jakou ! Pèrrik ! Pèrrik ! deuit buhan ta, deuit buhan ta, deuit buhan ta !

XIX DIVIZ

AN HEVELEP RE, JAKOU, PERRIK

PERRIK

Petra eo ar jabadao ze, santez Anna !

OLIER, *dalc'het atao*

Deuit, va bugale geiz ! An daou ze a fell stard d'ez-ho rei da gredi d'in ez eo troet va spered.

JAKOU

Ar pezh a lavar n'eo ket gaou, aotrounez. Hennez zo mestr an hostaliri ma. (*Ar vedisined a lask Olier da vont. Olier a azez pelloc'hik war gador, o sec'ha e dal*).

SALAUN

N'euz forz. Emaoun aman a berz ar c'homizer. Me a jomo.

KERAVEL

Ha me, ta, bet deuet a berz ar barner ! Me a jomo ive.

PERRIK

Mad. Choum a reot evit netra neuze.

SALAUN

N'eo ket. Ni a c'houlenno digant an archerien, mar bez red, klask an hini ma z'omp deuet d'e welet, ha ni her gwelo.

KERAVEL

Amzer zo breman. En em lakeomp hon daou, aotrou Salaun, ouz an daol vihan a zo aze. Eur werennadik win bennag a efimp, da c'hortoz. Jakou !

JAKOU

Aotrou !

KERAVEL

Ro d'eomp eur voutaillad vad ha koz, ha diou werenn.

JAKOU

Ia, aotrou. (*Jakou a ia dioc'htu da gerc'hat an traou hag a zeu enn dro, d'o lakaat war an daol*.)

SALAUN

Ar gwin ze daoust d'ez-han da veza mad, ne ket ker tomm hag an tan koulskoude. Aotrou Olier !

OLIER, *spountet eun tamm adarre*

Petra zo c'hoaz, aotrounez ?

SALAUN

Bezit dinec'h evit mad. Riou am euz. Vad a rafe d'in eun tammik tan ; digasit eur guchennik keuneud ha netra ken.

OLIER

Ia, aotrou. Deomp, paotred. (*Olier, Perrik ha Jakou a ia kuit.*)

XX DIVIZ

SALAUN, KRAVEL

KRAVEL

Va mignoun ker, iec'het mad d'e-hoc'h.

SALAUN

Ha d'ehoc'h ive, aotrou Krael. (*Eva a reont*)

XXI DIVIZ

SALAUN, KRAVEL, PERRIK *o tougen eur vriadik keuneud*

PERRIK

Setu ar c'heuneud. N'int ket fall; seac'h mad int. An tan ne vezo nemet bravoc'h aze. (*Perrik a daol e gueuneud er ziminal m'ema Iann atao kuzet ebarz*).

IANN, *o krial krenv adre ar ziminal*

Ohé ! la ! Ohé la ! na laka ket an tan, kre tartouz ! na laka ket. N'oun ket eur billig krampouez, me.

SALAUN, *o sevel*

Selaouit, Krael ; al labous a glaskomp eo, a zo aze o firbouchat er ziminal. (*A vouez huel*). Diskennit dioc'htu.

IANN *er meaz atao*

Me, diskenn ? ia ta, evit en em gaout gand an archerien adarre. Ta, ta, ta, ta, ta ! E leac'h diskenn, o pignate eo m'emaoun, da vont kuit dre an doen. Kenavo.

KRAVEL *o tostaat oc'h ar siminal hag o krial ebarz*

Mad. Ni a laka an tan er c'heuneud neuze.

IANN

O la la ! O la la ! na c'hrit ket.

Diskenn a ran, disken a ran. (*Iann a zeu er gambr, e zremm duet eun tamm gant huzuil ar ziminal, hag a azez var eur gador o tenna krenv e alan*).

SALAUN, *da Iann*

Peleac'h ema ho trouk ? Enn ho penn ? E poull ho kaloun ?

KRAVEL

Enn ho kof ? Enn ho kouzouk ?

IANN

E nep leac'h. N'em euz poan ebed ; me zo sioul evel eul logodenn er bleud. Ha n'eo ket gwir, Perrik ?

PERRIK

Eo, aotrou.

XXII DIVIZ

AN HEVELEP RE, TOUNIK, STRAKELL *eur pakad bihan gant-han, dindan e vreae'h*

TOUNIK

Setu an aotrou Strakell o tont, va mestr.

STRAKELL, *o sellet ouz ar vedistned*

Piou eo an dud se ?

KRAVEL

Piou eo ? medisined deuet a berz ar c'homizer hag a berz ar barner.

STRAKELL

Mad. Ne ran stad ebed me, euz a gement se. Deuet'oun da zifenn eun den. Na likiit ket ho tourn warn-han, medisined.

SALAUN *eun droukik enn han.*

Ac'hanta! Pe seurt gwir d'e-hoc'h, o komz evelse?

STRAKELL

Pe seurt gwir? Gwir an alvokad. Hag e welot raktal nerz ar gwir ze (*Digeri a ra e bakad bihan hag a wish e zillad alvokad, tok ha sae*). Ha breman, va mignounedigou, gwelet mad a rit va gwir, petra ta? Ha da genta, piou en deuz kavet e vije foll an den ze? Ar c'homizer hag ar barner o deuz gourc'hemenet d'e-hoc'h, medisined, dont aman. Mad. Mez piou en deuz lavaret d'ar c'homizer ha d'ar barner kas ac'hanoc'h aman? Piou? Piou?

SALAUN

N'ouzomp ket.

STRAKELL

Nouzoc'h ket? Ha n'ouzoc'h ket, ken nebeud, marteze, n'euz nemet tad pe tud unan bennag o deuz ar gwir da c'houlén, digant ar barner ma z'eo foll pe ne d'eo ket. Gortozit; n'oun ket deuet evit netra. (*O sellet war zu ar meaz*).

Sell ta, piou eo ar re ze o tont?

XXIII DIVIZ

AN HEVELEP RE; FANCH, MELIZ, *e zillad alvokad warn-han*

FANCH *o welet Iann*

Sell! va mab keaz hag a zo kavet adarre.

Allo! n'e peuz ken da ober, va mab, nemet dont enn dro, ganen, da Lanrivoare.

IANN *laouen*

Gwir eo, va zad. C'houi zo braz ho madelez. Awalc'h am euz, evit mad, euz micher ar bourc'hiz.

STRAKELL

Brao eo, mez piou a roio d'in e c'her ez eo echu evid mad, e kenver Iann Soner, troiou kamm an archerien, ar varnerien, hag ar vedisined? Piou hel lavaro d'in?

MELIZ *a vouez huel*

Me. Perag oun deuet me neuze ta? evit netra?

STRAKELL

En em glevomp hon daou neuze.

MELIZ

Mad. N'hor beuz ezomm euz den ebed da en em unvani mad hon daou.

STRAKELL

Gwir eo. (*O komz ouz ar re all*). It kuit oll. An dud a lezen pa vezont o unan, a gempenn kalz gwelloc'h an traou. (*An holl a ia kuit*).

XXIV DIVIZ

STRAKELL, MELIZ

MELIZ

Ne bado ket pell an abadenn etrezomp.

STRAKELL

Etre daou zen, pa vezont fur, ar stal a vez great buhan.

MELIZ

Ia avad. Anaout a ran ho furnez, pell-ze.

STRAKELL

Va furnez, aotrou Meliz, a zo bihan e kever hoc'h hini.

MELIZ

Hon diou furnez ni, aotrou Strakell, lekeat kever e kever, a zo ker braz an eil hag eben, dioc'h a leverer.

STRAKELL

Ker braz. A hend all, ne c'houlennan nemet eur gwir beoc'h evit Iann Soner. N'anavezann ket e dad, me. Me zo alvokad ar mab.

MELIZ, *eun tammik drouk enn han.*

Alvokad ar mab ! Ha n'oun ket me, marteze, alvokad an tad ? Daoust d'ehoc'h, aotrou Strakell, an tad zo hueloc'h eget e vab.

STRAKELL, *drouk enn han.*

Ha pehini anezho en deuz ezomm, evit mad, da veza difennet ? Ar mab, a gav d'in. Kalz a zrubuilhou am euz bet, me, gant-han, e leac'h n'ho peuz ken da ober, c'houi, gand an tad, nemet ober netra.

MELIZ, *drouk braz enn han.*

Ober netra ? Ober netra ? Livirit adarre, alvokadik fall ha dilabour, ha ne ouzoc'h nemet balbouza, balbouza ha balbouza evel eur Strakell vilin, dioc'h hoc'h hano !

STRAKELL, *drouk braz enn han.*

Drouk komzou ! deread eo an dra ze d'e-hoc'h avad, ia, alvokad dister ha paour, n'en deuz difennet biskoaz nemet riblerien, laeroun ha galouperien vro.

Me a c'houezo ho fri d'e-hoc'h.

MELIZ, *kounnar enn han*

Deuit dioc'htu ta ! deuit da c'houeza va fri ma welimp pehini ac'hanomp a vo treac'h d'egile. *(Meliz en em daol oc'h Strakell hag a grog enn han. En em ganna stard a reont. Klevet a reer : Alvokad digaloun ! Kanfard ! Glabouzer ! Furlukin ! Trouz braz a reont. Kadoriou a gouez. Olier o klevet an trouz, a zeu enn eur red. An daou alvokad a jom a zav sounn.)*

XXV DIVIZ

STRAKELL, MELIZ, OLIER

OLIER

Petra eo, petra eo ar safar ze a rit, aotrounez ?

STRAKELL, *o vouse'hoarzin*

Nebeud a dra. Eur gador eo a zo bet kouezet, n'ouzomp ket penaoz.

MELIZ, *o vouse'hoarzin*

Edomp o kempenn traou Iann Soner.

OLIER

Ne vo ket diez o c'hempenn. Fanch, e dad, a fell d'ez-han paea gwall zispignou e vab hag ar pezh zo dleet d'an hostiz, d'ar vedisined, d'an alvokaded, d'ar gemenerien ha d'ar re all.

STRAKELL

Mad, great ar stall neuze.

MELIZ

Ha great mad ; gwell aze. Nag a boan hor beuz bet e kement se.

Ar goel a zisken

EIL LODEN

*An dra ma a dremen e Lanrivoare, tost
d'an iliz, da zul*

KENTA DIVIZ

IANN, FANCH, *dillad sul an dud diwar ar meaz
warn-o*

IANN

Pegement e tleann me, va zad ho trugarekaad
hag ho pinniga, da veza va zennet euz an enkresiou
a dorre va fenn e hostalari ar Groaz-Wenn.

FANCH

An tad a zo e garg savetei e vugale, ha dic'hri-
sienna ar zorc'hennou a c'hell beza enn o fenn.
N'em euz great nemet ar pezh a dleen da ober, va
mab.

IANN *o sellet ouz e dad*

Mil bennoz Doue warn-oc'h, va zad.

FANCH

Ra vezo eur gentel evidoud, hag evit kalz a dud
iaouank all ive, ar pezh zo c'hoarvezet ganez pell
dioc'h ti da dadou, pell dioc'h ti da dud.

Nep a nac'h gwiskamanchou e dadou koz,
hennez a ia da ziskiant. Sell ouz ar merc'hed o
deuz dilezet dillad ker koant ha ken deread o
mammou Breiz-Izel. Marmouzezed n'int ken. An
dra ze a zo ker gwir all evit ar goazed. Nep a zilez
e Zoue, an traou a ia fall gant-han. An den a zo red
d'ez-han kaout eur feiz bennak. Ma ne gred mui e
Doue, e kredo er c'hartou, er sorserien, enn
huvreou hag er diotachou all a bep seurt. Sell ta,
setu Tounik o tont aman.

II DIVIZ

IANN, FANCH, TOUNIK *e zillad sul warn-han*

FANCH

Petra ta Tounik ? Ha n'e peuz mui war-n-oud da zillad alaouret evel kent ?

TOUNIK

Tra ayad ; ha laouen oun da veza o dilezet. Abaoue ma z'oun me paotr saoud e Kerfeunteun, me zo iac'h pesk. Sellit ouzin, va zremm a zo ruz gand ar iec'het mad. Bennoz Doue d'e-hoc'h, Fanch, ha da Iann ive, en deuz va lekeat d'hoc'h anaout. Ha n'ho peuz ket klevet eun denik koz o kana brao, bremaik.

IANN

N'hor beuz ket.

TOUNIK

Mad ; her c'hlevet a reot. Ema o tont etrezek enn-omp, eur maread tud gant-han.

FANCH

Feiz ! gwir eo. Petra a gan ar paour keaz den ze ? *(Eun den paour a zeu, o tougen eur pakadik kanaouennou ; ema an dud enn dro d'ez-han. Gwerza a ra kanaouennou.)*

III DIVIZ

FANCH, IANN, TOUNIK, EUR C'HANER PAOUR.
TUD EUZ A LANRIVOARE

AR C'HANER PAOUR

Da biou eur ganaouenn nevez ? Da biou ? Eur gwennek n'eo ken ! Eur gwennek ! Da biou kanaouennou ? Goulennit, goulennit : *(An tri miliner, Ar c'hemener laouen, Kan aouenn eured, Son an tadou koz.)*

FANCH, *a' vouez huel*

Brao kenan ! Prenomp Son an tadou koz. *(An holl a bren. Ar c'haner paour hag an holl a gan a unan.)*

SON AN TADOU KOZ

War don : *Disul vintin aba saviz* (1)

Hon tadou koz, evelomp ni, a gare dreist penn o Breiz. Daou denzor a skuille, dalc'hmad, levenez enn o spered : E kreiz o c'halounou kristen, o doa bleun aour ar feiz, Ha war o c'horfou leun a nerz, guiskamanchou kaer meurbed.

Feiz va Doue ! ar pezh a oa mad, enn amzer zo bet gweach all, Perag ta, enn amzer vremen, perag ta ne vefe ket ? Dalc'homp mad dillad hon tud koz, dalc'homp mad, bugale leal Ar gredenn gristen, ar gredenn enn hor Zalver benniget.

AN HOLL, *o krial*

Brao ! brao ! *(Klevet a reer kloc'h an oferenn bred, o seni. An holl a selaou.)*

FANCH

Kloc'h an oferenn bred eo. Deomp.

IANN

Ia, deomp da bedi an aotrou Doue. Ra vezo ganeomp e nerz evit labourat a greiz kaloun. Ra vezo douar santel Breiz benniget gant han da viken !

Ar goel a zisken evit mad

(1) *Barzas-Breiz. Le Hollaika.*